

**KENDAEL  
WAR AN ISDIORREADUR**

dindan baeroniezh Kelc'h Debauvais ha Preder  
Roazhon d'ar Sul 26 Mezheven 1966

**PER PENNEK GWILHERM DUBOURG  
GI ETIENNE YOUENN OLIER**

**TONKAD  
66**

**PREDER**  
Kaier 84-85  
Mezheven-Gouere 1966

**TONKAD**  
**66**

K E N D A E L   W A R   A N   I S D I O R R E A D U R  
=====

e ROAZHON  
Kelc'h Keltiek  
25, Rue du Fré Perché

d'ar Sul 26 Mezheven 1966

dindan baeroniezh

ar C'HELIC'H  
DEBAUVAIS

hag

ar gelaouenn  
P R E D E R

K a d o r i a d : G w e n a e l   M A Z E  
S e k r e t o u r : H e r r i   F I C H E T

R O L L   A N   D E V E Z H  
=====

Rannet e vo an devezh e dalc'h labour, etre 09.30 ha  
12.30 hag etre 15.00 ha 18.00. Goude pep displegadenn e vo  
un emziviz war an danvez displeget, - ur gendaeladenn, -  
renet gant ar C'hadoriad.

D a l c ' h   a r   b e u r e

- 09.30. Degemer ar gendaelidi.
- 10.00. Isdiorreadur hag Armerzh, gant Pêr PENNEK.
- 11.00. Isdiorreadur hag Istor, gant Gwilherm DUBOURG.

D a l c ' h   a n   e n d e r v

- 15.00. Isdiorreadur ha Bredoniezh, gant Gi ETIENNE.
- 16.00. Isdiorreadur ha Sevenadurezh, gant Youenn OLIER.
- 17.00. Klotadurioù.

P e r P E N N E K

I S D I O R R E A D U R H A G A R M E R Z H

Ne c'haller ket digeriñ bremañ ur gelaouenn - e n'eus forzh pe yezh e ve skrivet - hep lenn ar ger "isdiorreadur", hep kavout meneg eus an "Trede Bed" a vez lakaet ennañ ar broioù isdiorreet. An diorren hag an isdiorren a vez meneget evel kudennoù pouezusañ ar bed a-vremañ. Nevez eo ar gerioù-se ha nevez ivez an emskiant eus ar gudenn. A-raok 1945 ne veze ket komzet eus broioù "isdiorreet" met eus "pobloù warlerc'hiet" (Dalc'hit koun en doa Meven MORDIERN, oc'h heuliañ giz e amzer, roet an titl-mañ da Bevare Rann e Istor ar Bed : Pobloù warlerc'hiet ar bed betek hollvedvelierezh ar ouenn wenn.

Kemmet eo bet ar gerioù dre m'eo bet kemmet stad ar pobloù warlerc'hiet; freuzet eo bet an Impalaerdedoù Trevadennel savet abaoe pevar c'hantved gant Stadoù bras Europa; gounezet o deus ar pobloù warlerc'hiet o dieubidigezh politikel, ha doujañs a vez roet dezho.

Graet e vez anezho bremañ "broioù isdiorreet" pe zoken "broioù war ziorren" (emañ holl war ziorren, sañset !), met n'eo ket hepken ar gerioù-mañ anvioù nevez ha "doujus" roet d'ar baourentez pe d'ar stad armerzhel "warlerc'hiet".

Studet eo bet a-zevri ar mennozioù a "ziorren" hag a "isdiorren" gant an armerzhourion hag ar gevredadourion, ha kantadoù a levrioù a zo bet skrivet war ar c'hudennoù-se abaoe ugent vloaz ha dreist-holl abaoe dek vloaz.

N'eo ket ali an holl armerzhourion war dermenadur an isdiorren : kavet ez eus bet zoken gant unan anezho 21 termenadur disheñvel eus an isdiorren. N'eo ket hol labour burutellañ anezho. Studiañ a raimp hepken doareoù pennañ an isdiorren evit termenañ anezhañ. Klask a raimp e orin evit kompren ha displegañ e wikereoù hag ar stummoù disheñvel en deus bet; evit echuiñ e venegimp an diskoulm a c'hell bezañ kavet evit dont er-maez eus ar stad a isdiorreadur.

#### 1. Termenadur ha doareoù pennañ an isdiorreadur.

Sellomp da gentañ ouzh ar ger e-unan. Kavout a reer er ger "isdiorren" ur meizad keñverel, merket gant ar rakger "is"; ne c'hell bezañ meizet nemet e-keñver an "diorren". Met petra eo an "diorren" ? N'eo ket hepken kresk ha liesant ar boblañs, ar c'henderc'h hag ar bevezerezh, met ar c'hreskoù-se en ur gevredigezh ma kemm an emframmoù kevredadel hag armerzhel.

Ur vro pe un armerzh isdiorreet a c'hell bezañ keñveriet ouzh :

- An diorreadur a c'hellfed kaout o trevekant ar gwellañ holl binvidigezhioù ur vro. Met er ster-mañ e vefe isdiorreet

an holl armerzhioù, zoken hini ar Stadoù Unanet ha hini Bro-Sveden, rak kavout a rafed enno meur a binvidigezh chomet digorvo (mengleuzioù, dañvezioù gremm, douaroù frost, tud dilabour, h.a.). Ne vefe ket gwall dalvoudus ober gant ar ger isdiorreadur er ster-mañ.

- Met bez' e c'haller keñveriañ ar broioù isdiorreet ouzh ar rumm broioù sellet evel "diorreet".

Ar Reverzhi C'hreantel he deus roet lusk d'un argerzhad diorren e broioù Kornogeuropa e dibenn an 18<sup>t</sup> kantved; savet o deus d'ar Stad diorreet un nebeut broioù all e korf an 19<sup>t</sup> hag an 20<sup>t</sup> kantved. Broioù Kreiz- ha Norzeuropa, broioù Norzamerika, ha nevez 'zo un nebeut broioù a sav ivez d'ar stad diorreet : Japan, U.R.S.S., Italia, Dominionoù "gwen" an hanterzouar dehouel.

Aes eo ober an diforc'h etre armerzh an holl vroioù-se ha re an Trade Bed.

Met re zirezis e chom koulskoude ar meizad-mañ evit bezañ ur benveg-aezrannañ; ne c'haller ket ober gantañ evit dielfennañ emdroadur an armerzhioù ha ne lak ket a-wel, e vez aroueziet ar broioù isdiorreet gant emframmoù armerzhel ha kevredadel disheñvel diouzh ar re a gaver er broioù diorreet.

Ar broioù isdiorreet n'int ket hepken broioù nebeutoc'h diorreet eget ar re all, ha chomet war o lerc'h; bez' ez int e gwirionez broioù disheñvel dre o emframmoù.

Setu perak o deus ar gevredadourion hag an armerzhourion klasket termenañ an emframmoù-se dre gavout an azonoù a ziskouez

anezho end-eeun.

Ar poblañsour gall Alfred SAUVY en deus savet da skouer ur roll dek azon :

1. Feur mervel uhel.
2. Feur genel uhel.
3. Bevidigezh skort.
4. Feur uhel an diskoleion.
5. Feur uhel ar c'hounid-eion hag ar besketnerion er boblañs-labour.
6. Isgourc'hwel dre skorted an araezioù labour.
7. Sujidigezh ar vaouez.
8. Labour ar vugale.
9. Ezvezañs pe skorted ar renkadoù-etre.
10. Renadur aotrouniek : ezvezañs an ensavadurioù gwerinek.

Rolladoù all mui pe vui disheñvel zo bet savet; armerzhour-ion 'zo a gav a-walc'h dewerzhañ ar C'horvoder Broadel dre amezad.

Evel ma welit, n'eus amañ nemet un arouez armerzhel, ar 5vet : kenfeur ar c'hounideion; ar re all a zo kevredadel ha poblañsel.

Meur a roll all a zo bet savet. An armerzhour Harvey LEIBENSTEIN a ro pevarzek azon evit skeudenniñ doareoù hollek an isdioreadur, met an darn vrasañ anezho a verk lec'h ar gounezerezh en armerzhioù isdioreet<sup>(1)</sup>. Re hir e vefe reiñ

(1) E.J. LEBRET a ro diouzh e du ar rollad-mañ, ennañ c'hwec'h azon sellet gantañ evel ar re bouezusañ : A. Izelder ar C'horvoder Broadel dre amezad; B. Isvagadur ul lodenn vras eus ar boblañs hag astenn ar c'hleñvedoù yoc'hant; K. Gounezerezh kentidik, brizh-voziek, nann ardivinkaet; D. Rouezded ar bonderkadurioù; E. Skorted ar greanteladur; F. Digalennded; G. Ezvezañs pe skorted ar starn gouzieded ha kalvezourion; ha tri azon nebeutoc'h anataus : H. Trec'hded ar gennad gounezet ha pobladur ar ploue, dilabour dam-guzhet niverek; I. Barregzh arc'hantel bihan, feur espenn ha postañ izel, barr-kevala dister; J. Feur genel uhel ha recliñ genel laosk. (in Dynamique Concrète du Développement, Paris, 1963).

an holl rolloù, met bez e c'haller rannañ an azonoù e tri rummad :

- 1) Azonoù poblañsel (da skouer : ar feur-genel, ar feur-mervel),
- 2) Azonoù kevredadel (da skouer : ar barr-bevañ, al live-deskadurezh, lec'h ha pouez ar renkadoù-etre),
- 3) Azonoù armerzhel (da skouer : feur al labourerion-douar er boblañs, lodenn al labour-douar er c'henwerzh diavaez, bevezadur izel a c'hremm treloc'hel).

An holl rolloù-se ne roont ket kennebeut un termenadur resis eus an isdioreen, dacust ma roont ur skeudenn anezhañ; n'int ket dielfennadurioù met taolennadurioù; taolenniñ a reont dreist-holl heuliadoù an isdioreen e broioù an Trede Bed, ne c'haller ket kompren gwikefreoù an isdioreen gant an taolennadurioù-se a chom diflach a-grenn.

Bez' e c'hall ouzhpenn un darn vras eus an azonoù poblañsel ha kevredadel steuziañ tra ma chom koulskoude isdioreet an armerzh.

C'hoarvezet eo an dra-se e broioù isdioreet Europa hag emañ o c'hoarvezout e broioù 'zo eus an Trede Bed. Kemeromp skouerioù : Roll azonoù SAUVY o dije klotet (an darn vrasañ anezho da nebeutañ) ouzh stad Vreizh en 19<sup>t</sup> kantved, met ne glotfe mui bremañ, tra ma chom hon armerzh isdioreet.

Savet eo bet ar rolloù azonoù o keñveriañ ar c'hevredadoù hag an armerzhioù isdioreet ouzh re ar broioù dioreet hag o lakaat a-wel an disheñvellderioù.

Da skouer : er broioù diorreet eo izel ar feur-genel hag ar feur-mervel, an holl a vez skoliet, ne vez ket lakaet ken ar vugale da labourat, ar renkadoù etre eo ar re niverekañ, h.a., tra ma kaver ar c'hontrol e darn vrasañ ar broioù is-diorreet; klenket e vez neuze an holl zevoudoù-mañ er roll azonoù, ha setu. Met n'eo ket a-walc'h aroueziañ doareoù pe heuliadoù an isdiorren, ret eo klask an abegoù ha lakaat sklaer n'eo ket an isdiorren ur meizad keñverel met ur meizad darempredel; se a c'hell bezañ diskouezet o studiañ orin ha gwikefreoù an isdiorren.

## 2. Orin ha gwikefreoù an isdiorreadur.

Ganet eo bet an isdiorreadur diouzh al levezonoù embreget gant armerzhioù treuzfurmet dre ar "Reverzhi C'hreantel" war armerzhioù ar broioù n'o doa ket degemeret anezhi. A-raok ar Reverzhi C'hreantel ne oa ket, d'hor meno da nebeutañ, a isdiorreadur gwirion, peogwir ne oa ket a ziorren pe gentoc'h : kudennoù an armerzhioù rakgreantel ha rakkevalour a oa disheñvel. Setu perak ne c'haller ket lakaat keñver-ha-keñver stad ar broioù isdiorreet en hon amzer ha hini Kornogeuropa en 18<sup>t</sup> kantved.

Disheñvelderioù don a oa evel just etre an armerzhioù rakgreantel, met un dra a oa boutin dezho : bez' e oant kempouezet ; ha hogos digemm; kempouezet e veze an armerzh gant ur stuzegezh henvoazel (evel ma oa e maezioù Breizh betek derou an 20<sup>t</sup> kantved). Ne oant ket digemm e gwirionez, met ar c'hemmoù, pa oa anezho, a c'hoarveze goustadik a-walc'h; kemmoù trumm a c'hoarveze a-wechoù met degaset e vzent gant ar

brezel ha ne oant ket frouezh al levezonoù armerzhel : aloubidigezh Amerika gant Europiz he doa freuzet da skouer stuzegezhioù hag armerzhioù ar pobloù indian kemm pe digemm; kempouez e oa etre ar boblañs hag ar c'henderc'h, etre ar c'henderc'h hag ar c'halvezerezh, h.a.

An holl kempouezioù-se a zo bet distrujet gant stok hag emled ar sevenadur greantel ha kalvezel; c'hoarvezet eo an holl vroioù, met e broioù 'zo e veze frouezh un argerzhad-diorren renet gant nerzhioù-diabarzh, distrujet e veze neuze ar sevenadur hengounel hag ar c'hempouezioù kozh, met ademframmet e veze an armerzh hag ar c'hevredad e-doug an argerzhad endeeun ha kempouezioù nevez a veze steuet; un ademframmadur a heulie un diemframmadur, hervez termenadur ar c'hevredadour GURVITCH.

Met e broioù all, e chom diglok emled ar sevenadur greantel dre ma'z eo frouezh nerzhoù-diavaez; levezon ar c'hreizennoù greantelaet a zistruj ivez ar c'hempouezioù kozh hep lakaat netra en o lec'h, o krouiñ er c'hontrol ur rummad digempouezioù : da skouer digempouezioù etre an ezhommoù hag ar c'henderc'h, etre ar boblañs hag ar c'henderc'h, h.a.

Daoust d'an disheñvelderioù bras a gaver etre ar broioù isdiorreet (da skouer etre Kongo ha Mec'hiko, etre Breizh hag Aljeria) ez eus un devoud boutin dezho : distrujet eo bet e pep hini anezho ar c'hempouezioù armerzhel ha kevredadel henvoazel, tra m'en em lede ur rummad digempouezioù. Levezon ar c'hreizennoù diorreet a zeu diouzh an estrenvro, ha diaes eo an ademframmadur, a en em stumm alies war ul live izeloc'h.

(gant ermaeziadeg un darn eus ar boblañs da skouer); a-wezhioù zoken n'eus adanframmatadur ebet, ha setu perak e c'hell Germaine TILLION komz eus "clochardisation" Berbered ar menez Aures en Algeria, Polineziz Enezenn Bask a zo kouezhet en hevelep stad, ha meur a boblad all.

An nerzhoù-diavaez a zispenn war un dro an armerzh hag ar stuzegezh henvoazel. An traoù oberiet gant ijinerezh ar broioù diorreet a vez gwerzhet marc'hadmat (evel ar gwiadoù-kotoñs oberiet e Manchester ha gwerzhet dre ar bed holl en 19<sup>t</sup> kantved).

Dont a ra tamm ha tamm annezidi ar broioù mestroniet da zilezel ar gwiskamentoù, ar binvioù, an arbeuri, an armoù a veze graet betek neuze gant izili an tiegezh pe ar neuriad, pe a veze oberiet gant dornwezhourion ar gêriadenn pe ar gêr dostañ.

Setu dres ar pezh a zo c'hoarvezet abaoe derou an 19<sup>t</sup> kantved betek hon amzer en holl vroioù isdiorreet. Rivinet eo bet an ijinerezhioù henvoazel hag an dornwezhourion; darn eus ar re-mañ o deus kendalc'het da labourat tra na chom ul lodenn eus ar boblañs fenn d'an henvezioù (kemenarion ha broderion e bourc'hioù Breizh betek 1920-1930), met kreskiñ a ra niver an dud dilabour.

Anavezet mat eo planedenn gwiaderion India lakaet dilabour gant kevezerezh gwiadoù-kotoñs Manchester; nebutoc'h anavezet mat heñvel a-walc'h eo bet planedenn gwiaderion Vreizh (ar re o deus lennet tezenn an Ao. beleg GAUTIER, Pourquoi les Bretons s'en vont. Un siècle d'indigence. Paris, henn goar mat).

Degaset eo bet koulskoude gounidigezhioù nevez ha savet greantioù arnevez met ar c'henderc'h anezho a vez kaset d'ar vro diorreet he deus krouet anezho; staget eo evelse muic'h-mui armerzhioù ar broioù isdiorreet ouzh re ar broioù diorreet. Ar re-mañ a drevaka dreist-holl ar gounidigezhioù hag an ijinerezhioù a c'hell pourchas dezho danvezioù o deus eshomm anezho, setu perak eo bet krouet plantadegoù e broioù trovanel pe c'hou-drovanel (evit kaout sukr, kafe, kacoutoug, danvezioù gwiedel) ha digoret mengleuzioù (evit kaout metaloù pe danvezioù gremm); an danvezioù-mañ a vez pleusket en estrenvro. Krouet e vez koulskoude greantioù-pleuskañ, met n'int ket niverus ha staget int ivez ouzh an armerzh mestroniour ha n'o deus ket c'hoariet ur roll a "greizennoù-diorren" (da lavarout eo n'o deus ket lakaet da sevel ijinerezhioù all en o c'hichen). Keñvericomp da skouer ar greantioù-dir er Ruhr hag an arsenailhoù e Breizh; e-kichen ar re gentañ ez eus bet savet ur rouedad greantioù-pleuskañ all; arsenailhoù Brest hag An Oriant n'int ket stag ouzh armerzh ar vro ha n'o deus ket lakaet greantioù all da ziwanañ. Heñvel eo evit glaouegi Rembre.

Setu perak e chom alies ar c'hreizennoù armerzhel arnevez evel "enezennoù" er vro isdiorreet; ar c'hehenterezh arnevez a vez savet evit surañ an darempredoù etre an enezennoù-se hag an armerzh mestroniour. Staget e vez ar plantadegoù hag ar mengleuzioù gant hentoù-houarn ouzh ar porzhioù, peogwir e vez exporzhet ar c'henderc'h.

Merket eo evel-se emfram ar c'henwerzh-diavaez gant an isdiorren, rak graet e vez an eskemoù gant an armerzh-mestron-

iour dreist-holl; skouerioù : dont a rae e 1960 eus Bro-C'hall 94% eus enporzhiadoù Aljeria ha 95% eus ezporzhiadoù Aljeria a yae da Vro-C'hall. Sifroù kevatal a vefe kavet evit Breizh sur a-walc'h. 41% eus ezporzhiadoù Venezuela a yae d'ar Stadoù-Unanet ha 63% eus enporzhiadoù Venezuela a zeue eus an hevelep bro, tra ma kase ar Stadoù-Unanet 4,9% eus o ezporzhiadoù d'ar Venezuela ha ma prenent eno 6,3% eus o enporzhiadoù. Ezporzhiadoù ar broioù isdiorreet a c'hoarvez dreist-holl eus danveziou-bevañs, danveziou krai ha danveziou gremm.

Un nebeut skouerioù :

Broioù	Danvez	Floavezh	Dregantad eus an ezporzhiadoù
Senegal	Krañ-douar ha kenderc'hadoù deveret (eoul, soevon, h.a.)	1961	84%
Aod an Olifant	Kafe ha kakao	1961	75%
Gabon	Koad	1961	70%
Zambia	Kouevr	1957	92%
Liberia	Kaoutchoug ha houarn	1957	86%

Ezporzhiadoù Breizh a vez enno dreist-holl kenderc'h al labour-douar (legumaj, kig) hag ar pesketaerezh.

Ezporzhiadoù ar broioù isdiorreet a c'hoarvez dreist-holl eus danveziou pleusket.

Ur sell hon eus taolet evel-se war orin ha gwikefreoù an isdiorreadur.

Bez' e c'hellomp lavarout neuze e c'hom armerzhioù ar broioù isdiorreet armerzhioù "kentael".

Rannet eo bet ar boblañs etre tri gennad gant an armerzhour Colin CLARK : ar gennad kentael a glot gant an obererezhioù o pourchas danveziou krai, da lavarout eo : al labour-douar, ar pesketaerezh hag ar menleuzioù; ar gennad silvedol a dolo an obererezhioù o pleuskiñ an danveziou krai - eleze an ijinerezhioù-pleuskañ -; ar gennad tredeel a dolo an obererezhioù all, da lavarout eo an dezougererezh, ar c'henwerzh hag ar gwazadurioù.

An darn vrasañ eus poblañs-labour ar broioù isdiorreet a vez implijet er gennad kentael, ha dreist-holl el labour-douar: 54% e Breizh (1954), 55 e Mec'hiko (1955); 58% e rannbarzhioù isdiorreet Suesuropa (betek 70% ha 80% en Afrika Du). Kouezhañ a ra an dregantad dindan 20% ha zoken 10% er broioù diorreet.

Kentael e vez an armerzhioù isdiorreet, met bez' ez int ivez armerzhioù mestroniet, peogwir emaint stag mui pe vui ouzh un armerzh diorreet a zevoud enno gweredoù-mestroniañ.

Setu perak e c'hellomp ober un diforc'h etre an armerzhioù isdiorreet hag an armerzhioù henvoazel; kentael e oa ivez ar re-mañ, kentaeloc'h zoken, met ne oant ket mestroniet gant an armerzh all; ha setu perak d'hor meno, ne c'haller ket komz eus an isdiorreadur a-raok ar Revezhi C'hreantel.

Ar mestroniadur armerzhel a c'hell mont gant ar mestroniadur politikel, met n'emañ ket atav stag outi : riezou ha Stadoù emren a c'hell bezañ mestroniet war an dachenn armerzhel. Republikoù bihan Kreizamerika a zo stag o armerzh ouzh hini ar Stadoù Unanet.

Distrujet eo bet tamm-ha-tamm ar stuzegezh hag an armerzh henvoazel en holl vroioù isdiorreet, e Breizh en 19<sup>t</sup> kantved, e Norzafrika en 20<sup>t</sup> kantved. An Ao. De BERNIS, keleñner war ar skiantoù armerzhel hag arbennigour war an isdiorreadur, a skriva e 1959 : "Emañ Tunizia digor a-grenn war an armerzh gall ha ne c'hellomp ket chom hep soñjal er pezh a voe distrujidigezh armerzh henvoazel Breizh en 19<sup>t</sup> kantved... Adkevout a rafemp en istor-mañ un darn vras eus diaesterioù Tunizia bremañ."

Digempouezioù heñvel a gaver neuze en holl vroioù isdiorreet daoust ma'z eo disheñvel a-walc'h o emframmoù kevredadel; labourat a reont da ledanaat an dizingalded.

Studiet pizh eo bet gweredoù ar mestroniañ gant an armerzhourion. François FERROUX a gomz eus "gouharz frammel war an diorren", levezon an armerzh mestroniour o virout ouzh framm an armerzh mestroniour d'en em azasaat ouzh amvezidoù nevez, hag o freuzañ ennañ dilerc'hioù ar frammoù kozh kenkoulz hag an eginoù frammoù nevez. An armerzhour svedat G. MYRDAL a zeskriva an anadenn evel "un devouderezh war gelañ dezhañ gweredoù assammat" pe evel "un argerzhad dispenn assammadek", o pouezañ bewezh war ar c'helañ emwashaat ennañ bac'het ennañ an armerzhioù isdiorreet. Tezenn E. GAUTIER a ziskouez mat stummadur hag emroadur an argerzhad-se e Breizh e doug an 19<sup>t</sup> hag an 20<sup>t</sup> kantved : distruj an ijinerezhioù henvoazel, ar gwiaerezh dreist-holl, diskar ar pesketerezh, enkadennoù ar gounezerezh; da heul e tigresek ent-kendalc'hel ar boblañs (Côtes-du-Nord : 641 200 ann. e 1866, 497 800 e 1962) o virout end-seun ouzh an armerzh a adkevout e gempouez, hag o tevoudañ

da heul divroedegoù nevez.

Kemer a ra skouer an dizingaldedoù etre rannbarzhioù en ur vro.

An dizingaldedoù a zo frouezh labour nerzhoù an nevid; an dud, ar c'hevala, ar gwazadurioù a vez dedennet atav gant ar c'hreizennoù armerzhel war gresk.

Distrujidigezh an ijinerezhioù henvoazel hag an dornwez-houriezh a lez ur bern tud dilabour. Ar wiaderion indezat a zo aet da glask labour war ar maez; bez e oa e 1836 e departamant Aodoù-an-Hanternoz 37 000 klasker-bara ha 43 000 ezhommeg "en-skrivet", ha 600 000 annezad; e Penn-ar-Bed d'an hevelep mare e kaved 1 ezhommeg war 12 annezad; 49 000 klasker-bara a veze kontet c'hoazh e 1879 (sifroù roet gant an Ao. GAUTIER). Hag e-touez ar re a gendalc'he da labourat, ur bern a veze ar brasañ dienez. Armerzhourion 'zo, a bouez dreist-holl war doareoù poblañsel an isdiorreadur. Kudenn kresk ar boblañs a zo e-touez ar re grevusañ evit ar broioù isdiorreet; deuet eo ar gudenn-se eus distrujidigezh an armerzh henvoazel hag eus degaserezh ar vezekniezh arnevez. Krouet eo bet an digempouez etre ar boblañs hag ar c'henderc'h : uhelaat a ra ar feur-generel tra ma vihana ar feur-mervel; kreskiñ a ra neuze ar boblañs buanoc'h eget ar c'henderc'h; poblañs broioù isdiorreet Kreiz-ha Suamerika a gresk a 3% bep bloaz, da lavarout eo e tacagemento a-benn 20 vloaz ac'henn. Met kudenn ar boblañs a c'hell kemer ur stumm all ; an digresk e-lec'h ar c'hresk. Setu pezh a c'hoarvez e broioù isdiorreet Europa. (Evel Breizh, Iwerzhon, Spagn, Suitalia, h.a.); digresket eo bet ar feur-generel abaoe an 19<sup>t</sup>, daoust ma chom un tammig uheloc'h eget e rannbarzhioù diorreet Europa.

An digempouez a sav amañ diouzh an diforc'h etre ar goulenn hag ar c'hinnig labour; ar c'hinnig labour a zigresk peogwir ez eo distrujet an armerzh henvoazel, hag an disoc'h a vez an divroerezh; 8 milion a Iwerzhoniz a guitaas o bro e-doug ur c'hantved hag ouzhpenn ur milion a Vrezhoned.

Setu perak ez a kuit an dud yaouank, ha perak e vez skoet ar broioù isdiorreet gant un isgourc'hwel, an dilabour hag an divroerezh war un dro.

Marteze e c'hallfed soñjal ez eo an divroerezh un diskoulm; un diskoulm eo war un dachenn hiniennel hepken, rak a-hend-all an divroerezh ne ra nemet gwashaat stad ar vro; ar re oberiantañ a ya kuit ha digreskiñ a ra niver an dud en oad da labourat; ar vugale hag ar re gozh a chom hag e vez krouet evel-se un aergelc'h a zo un hazz d'an arackant; digreskiñ a ra ar c'hen-derc'h, ar barr-bevañ a vez izel hag izel ivez an arboell.

An arboell zoken ne vez ket lakaet da dalvezout er vro, rak n'eo ket ar re yaouank hepken a ya kuit, met an arc'hant; meur a abeg a zo da fuadur ar c'hevala : enkted an nevid ha gwanded ar greanterezh er vro isdiorreet; levezon an armerzh mestroniour a zedenn ar c'hevala. E 1950, fiziadurioù Gwatemalaiz e bankoù ar Stadoù Unanet a save da 14 milion "quetzal", kement ha talvoudgezh ar c'hevala dastumet er vro a-bezh e-doug ur bloavezh.

Pa n'eus ket a delloù-maltouterezh war ar c'henwerzh etre an div vro, e vez drastusoc'h an efadoù-se. Anavezet mat eo skouer rannbarzhioù Suitalia; p'eo bet unvanet Italia, eo bet lamet an delloù-maltouterezh etre an Norz hag ar Su; met ijin-

erezhioù an Norz a oa arvevesoc'h eget re ar Su, hag ar re-mañ a zo aet da get.

Aesaet eo bet trec'h ijinerezhioù an Norz gant distruj-idigezh kreizennoù politikel ar Su; kollet o doa ar re-mañ o emrenezh, ar galloud politikel o doa dalc'het gant kreizennoù Norzitalia, levezonet d'ar mare-se gant kevalaourion ha greantourion an Norz. Suitalia evel Breizh en doa kollet evel-se e emrenezh hag e ijinerezhioù; al labour douar en deus kemeret ul lec'h pouezusoc'h en o armerzh.

Bez' e c'hallomp degemer neuze e c'hall un armerzh isdiorreet bezañ dezrannet da gentañ evel un armerzh kentael e-lec'h m'eo bet distrujet ar c'hempouezioù henvoazel dindan levezon nerzhoù-diavaez un armerzh mestroniour hag e chom skoet gant ur gouharz framme o herzel ouzh lañs an diorren.

Kemeret hon eus skouerioù e Breizh evel e meur a vro all, met ma c'hell an dezrannoù klotañ ent-hollek gant an holl vroioù isdiorreet, e tleer anzav e vez kavet an isdiorreadur dindan meur a stumm.

### 3. Stummoù disheñvel an isdiorreadur.

N'eus ket ur stumm unvan e isdiorreadur daoust ma c'haller kavout atav an doareoù kentael ha mestroniet; disheñvelderioù bras a zo; darn a oa anezho dija a-raok ar Reverzhi C'hreantel, ar re all a zo bet gant diwar emdroadurioù istorel disheñvel.

Distrujet eo bet tamm-ha-tamm ar stuzegezh henvoazel en holl vroioù isdiorreet (da skouer : e Breizh en 19<sup>th</sup> kantved,

e Norzafrika en 20<sup>t</sup> kantved), met e broioù 'zo, e chom c'hoazh aspadennoù anezhi; hevelep tra evit an armerzh henvoazel; aet eo koulz lavaret da get e broioù 'zo (meur a zoare henvoazel a gaved c'hoazh da armerzh Breizh betek 1945, hag aspadennoù a chom c'hoazh) tra ma kile hep mont da get e broioù all (Afrika). Kavout a reer neuze daou c'hennad armerzhel dilianm kenotrezo, ha setu perak e komzer ivez eus armerzhioù divelfennel ha diempret.

Emdroadurioù a-ziforc'h a zo c'hoazh ha kemer a ra neuze an isdiorreadur stummoù disheñvel; ar c'hudennoù a sav diouto a c'houlenn ivez diskoulmoù disheñvel war veur a boent.

Bez' e c'halled renkañ ar broioù isdiorreet e meur a rummad ma kemerer azonoù disheñvel; bez' ez eus broioù poblet-rouez ha broioù poblet-stank, broioù ma'z eo ar gounezerezh astennidik ha kentidik, broioù m'eo askoridik, broioù hep greanterezh, ha reoù all a zo dija war c'hreantelaat, broioù dindan ur galloud estren ha broioù chomet dieub...

Re lies e vefe studiañ evel-se an diforc'hoù resis a gaver etre ar broioù isdiorreet; reiñ a reomp un daolenn verr eus lec'hioù douaroniezhel ar broioù isdiorreet er bed a-vremañ.

Kavet e vez broioù diorreet en hanterzouar kleizel (Norzamerika, Europa, U.R.S.S., Japan) tra m'int rouez e hanterzouar dehouel (Subrazil, Argantina, Unvaniezh Suafrika, Aostralia, Zeland Nevez, eleze broioù dindan un hin klouar ha poblet dreist-holl gant Europiz). An Trede Bed en em led etre an daou rummad-se; aloubet eo bet etre ar 16<sup>t</sup> kantved hag an 19<sup>t</sup> kant-

ved gant riezoù Europa.

N'eus nemet un nebeut broioù hag o deus miret o rezid politikel, hag ar re-mañ zoken o deus gouzañvet gweredoù-mestroniañ an armerzhioù europat; n'eus nemet ar Yemen hag an Afghanistan hag o deus miret armerzhioù henvoazel betek hon amzer.

#### a) Afrika

Isdiorreet eo Afrika en he fezh, koulz lavaret; n'eus nemet Unvaniezh Suafrika hag a c'hall bezañ sellet evel diorreet, met divelfennek eo hec'h armerzh dre ma chom ul lodenn eus ar boblañs du er-maez eus ar gennad arnevez.

Trevadennet eo bet Afrika gant Europiz en 19<sup>t</sup> kantved, hag e kaver enni skouerioù niverus eus armerzhioù divelfennek ha diempret, gant ar gennad henvoazel kentidik hag ar gennad arnevez ahelet war an diavaez. Bez' ez eus koulskoude disheñvelderioù etre broioù Norzafrika ha re er c'hreisteiz d'ar Sahara (Afrika Du); re Norzafrika, eus Maroko betek Egipt, a zo bet stag ouzh ar sevenadurioù Morkreizat ha liesekoc'h eo o armerzhioù.

#### b) Azia

Trevadennet eo bet Azia gant Europiz, nemet un nebeut broioù : Yemen, Afghanistan, Iran, Sina, Thailand, Japan, met ar re-se zoken edo o armerzh henvoazel war zispenn; n'eus nemet Japan hag en deus sellet herzel ouzh gweredoù-dispenn an nerzhioù diavaez hag en deus roet lañs d'un argerzh-diorren.

Un nebeut armerzhioù a zo bremañ war ziorren (Sina, India) met chom a reont c'hoazh kentael.

### k) Kreiz- ha Suamerika

Ar broioù-mañ a oa betek deroù an 19<sup>t</sup> dindan dalc'h Spagn ha Portugal; sevenadurioù henvoazel an Indianed a zo bet dispennet ha krouet eo bet gant Spagniz ha Portugaliz kevredadoù trevadennel harpet war drevekaat an douar (plant-adeoù korz-sukr, kakao, h.a.), hag ar mengleuzioù (sour hag arc'hant Mec'hiko ha Perou). Gounezet ganto ar rezid politikél e kouezhas ar broioù-se dindan levezon armerzhel ar Stadoù-Unanet, ar c'hreizemou greantel a zo stag ouzh re ar Stadoù-Unanet, hag o c'henwerzh a vez graet gant ar re-mañ. Kentael e chom o armerzhioù nemet e Subrazil.

### d) Europa

Disheñvel-bras eo an isdiorreadur en Europa diouzh an hini a gaver e lodennoù trovanel ar bed, rak broioù pe rannbarzhioù isdiorreet Europa a vez ganto emframmoù kevredadel hag armerzhel kar ouzh re ar broioù pe ar rannbarzhioù diorreet, met levezon ar re-mañ he deus krouet un argerzh dispenn. Isdiorreet eo neuze lodennoù Europa n'o deus ket anavezet un diorren greantel hag un armerzh kentael ha mestronek o deus, da lavarout eo broioù Kornog-, Kreisteiz- ha Reteruropa.

#### Kornogeuropa

Talbenn atlantel Europa a zo mui pe vui isdiorreet : Portugal, Galiza, Mervent Frañs, ar broioù keltiek; c'hoariet o deus koulskoude gwezhall ur roll pouezus en Istor Europa, met anavezet o deus un diskar abaoe an 18<sup>t</sup> kantved; bez' ez eus broioù en o zouez hag o deus kreizennoù greantel evel Sukembre, Izeldirioù Bro-Skos, Bro-Naoned, arvor Buzkadi,

Norziwerzhon, met ar greantioù-se a vez alies arbennik-tre (saverzh-listri da skouer) hag ez int atav astennadurioù an armerzhioù mestronek.

#### - Sueuropa

Broioù Europa lec'hiet war adoù ar Mor-Kreiz a zo bet kreizennoù sevenadurezh en Henamzer hag er Grennamzer, met anavezet o deus un diskar abaoe ar 17<sup>t</sup> kantved a-rak ar Reverzhi C'hreantel; donat he deus c'hoazh houmañ ar c'hleuz etre ar broioù Morkreiz ha Kreiz-, Norz- ha Gwalarnuropa; n'eus nemet Norzitalia hag a ve bremañ diorreet.

#### - Reteruropa

Broioù Reteruropa, da lavarout eo ar re a zo lec'hiet en tu all da harzoù Alamagn hag Aostria a oa a-rak 1939 broioù isdiorreet-rik, met emaint war ziorren abaoe 1945; torret eo bet al liammoù a eree o armerzhioù ouzh re Alamagn ha broioù ar C'hornog; krouet ez eus bet greantioù evit sevel un armerzh liesek; met daoust d'ar pezh a zo bet graet, ar gennad kentael en deus c'hoazh ul lec'h pouezus en o armerzh, a chom ivez dindan vestroniadur an armerzh soviedel.

#### 4. An diskoulmoù d'an isdiorreadur.

Ar broioù isdiorreet eo ar re n'int bet dirazet gant ar Reverzhi C'hreantel nemet dre hantererezh ar broioù he renas. Setu perak, evel m'hon eus henn diskouezet, ne c'haller ket o c'heñveriañ ouzh broioù Europa a-rak emled ar greanterezh, ha kentañ dastumenn, ne c'hallont ket tremen dre an hent o deus heuliet ar broioù kentañ diorreet : an digempouezioù kevred-

igezhel hag armerzhel a verk an isdiorreadur a c'houlenn di-skoulmoù dibarel.

Riezoù 'zo o deus gallet, dindan un nebeut dekvloaziadoù, terriñ gwalenn an isdiorren. Ur skouer splann zo gant broioù Lec'hleann : Sveden da skouer a oa e 1870 ur vro baour, dezhi un armerzh kentel, a veze kuitast gant he yaouankiz o tivroañ a-vil-vern da Amerika. Deuet eo, dindan bemont vloaz, da vezañ ar riez europat dezhi ar barr-bevañ uhelañ (1750 dollar dre annezad e 1962). Dre-se, e ro ar C'hel. Walt W. TOSTOW skouer Sveden da riezoù nevez Afrika. Ret eo anzav avat e oa asec'h da Sveden kacout an disoc'h d'un argerzhad-diorren, o vezañ ma ne oa ket mestroniet e gwirionez e armerzh hag e oa an digempouezioù anezhañ pell-bras a vezañ ken grevus hag ar re a weler o reuziañ er broioù bet trevadennet.

Evit terriñ an digempouezioù isdiorreel ha lakaat e-lec'h an argerzhad-dispenn un argerzhad-diorren, e ranker kacout galloud war an devoudañ anezho; pennañ devouder an isdiorreadur zo donedigezh a-ziavaez an nerzhoù-arackaat; da heul, ar galloud nemetañ gouest da lakaat termen d'an isdiorreadur zo ar galloud politikel, al levierezh Stad. Setu perak e vez ken kreñv, hervez ar c'hevredadour G. BALANDIER, an emsavioù broadelour er broioù isdiorreet adalek ar mare ma vennont diorren.

Ar rezid vroadel<sup>(1)</sup> a hañval bezañ un amplegad ret da

(1) An armerzhour svedat Gunnar MYRDAL a bouez en e levrioù war diziouerusted ar rezid politikel evit ar broioù isdiorreet : "an dra briziusañ a zo en o c'herz, dre ma c'hellont, ur wezh dizalc'h ent-politikel, ren o buhez armerzhel hervez mad o fobloù."

lemel ar mestroniadur met n'eo ket a-walc'h. Neur a vro dieub ent-politikel a chom mestroniet ent-armedhel, pe a ziskouez bezañ divarrek da luskañ un argerzhad-diorren. Dre-se, e ranker arveziañ, goude an emgann evit ar rezid vroadel politikel, un emgann all evit ar rezid armerzhel.

Studiañ an hentenoù hag an araezioù da diorren un armerzh zo er-maez eus danvez an displegadenn-mañ. Ar pal da dizhout zo kemmañ un armerzh kentel ha mestroniet en un armerzh liesek, dizalc'h hag o kreskiñ dre e vevusted dezhañ e-unan. Mall eo henn ober, rak armerzhioù ar broioù diorreet a gresk buanoc'h eget armerzhioù ar broioù isdiorreet ha donaat a ra bemdez ar c'hleuz etrezo. Ret eo neuze kavout un "hent-treuz" davit an diorren ha fiziout un darn vras eus ar gefridi-diorren e daouarn ar Stad. Ar skoazell roet gant ar broioù diorreet d'ar broioù isdiorreet zo a-bouez, hogen tud ar broioù isdiorreet a dle fiziout da gentañ warno o-unan.

Annet eo pa seller ouzh devouderezh ar "burzhudoù armerzhel" c'hoarvezet e broioù ken disheñvel ha Sina, Japan, Alamagn, Israel. Ger-stur ar vroadelourion iwerzhonat : "Sinn-Fein" (ni hon-unan) a dalv ivez evit ar stourm a-enep an isdiorreadur.

))o((

G w i l h e r m    D U B O U R G

I S D I O R R E A D U R    H A G    I S T O R

Goulenñ a reer diganin komz diwar-benn an isdiorreadur hag an istor. Anzav a ran da gentañ ne welan ket sklaer-tre petra zo dindan an titl-se a zo difetis a-walc'h evit ma vefe tu da lavarout n'eus forzh petra a-benn ar fin hep mont e-maez ar goulenñ. O vezañ ma komzan ouzh tud a gemer perzh mui pe vui e emsav Breizh e c'heller evelato kompren ar studi-adenn-mañ evel un doare d'ho kadarnaat en ho mennozioù hag ho youl da stourm evit ar vro. Adalek an derou eta e c'hellomp en em harpañ war un diazez diarvar a zo dreist deomp, ur galv na c'hellomp ket anataat ent-didrec'hus d'ar re all marteze, met a zo merzhet koulskoude gant pep hini ac'hanomp evel un

uhelvennad da seveniñ. An uhelvennad-se eo an uhelvennad breizhat.

Petra eo neuze bezañ isdiorreet e-keñver an uhelvennad-se nemet bezañ divarrek da veizañ hor memnozioù e diabarzh ur framm poellek ha da seveniñ ur stourm a lakaio anat d'an holl ez eo Breizh ur vro. Rak evit al lodenn vrasañ eus ar Vrezhoned lavarout ez eo Breizh ur vro a zo kentoc'h mont etrezek an hunvre hag ar faltazi eget dere'hel d'ar pezh a anvont ar redi pemdeziek.

Breizh n'eo ket ur vro wirion evit ar Vrezhoned dizesk e-keñver o istor, nag evit an holl re na gemeront perzh oberiant ebet e emsav ar vro-mañ, dacust ma chom enno kaer o deus ober un elfenn vreizhek bennak, un emzalc'h atav dizegemeradus evit ar spered gall. N'eo ket dav displegañ penaos eo bet sanket en o fenn un istor hag uhelskouerioù estren dre ar skolioù, ar skinwel pe ar c'hazetennoù, gant levrioù ha gouelioù a bep seurt. N'eo ket talvoudusoc'h kennebeut prederiañ hir a-zivout al levezon o deus bet war ar Vrezhoned an darvoudoù a-zivavaez o deus kemeret perzh enno mui pe vui, evel ar brezelioù hag ar stourmoù politikel estren dezho. A-walc'h eo gouzout e tispieg al lodenn vrasañ eus ar Vrezhoned

arallekaet o c'hudennoù don war zigarez kendivizout diwar-benn mojennoù pe marzhvoudoù gall a dalvez dezho da bennskouerioù. N'hellomp ket eta degemerout ur weledigezh mojennel eus an istor, evel ma ra ar C'hallaoued a gelenn deomp buhez o impalaerded evel ma kelenner al lennegezh, gant mojennoù hag uhelskouerioù, met a nac'h atav ar barnadennoù politikel evel un dra berzet a-grenn ouzh ar pobloù o deus kabestret.

Petra eo neuze istor Breizh, ma ne ziazeomp ket anezhañ war vojennoù ar C'hallaoued. An istor a zo kentoc'h ul lodenn eus ar sevenadur, da lavarout eo ul lodenn eus ar strivoù a reomp evit seveniñ hon uhelvennad, evit anataat ez eo Breizh ur vro. Fa lavaran "a reomp" ne soñjen ket ennoomp-ni hepken, met en holl dud o deus stourmet evit ar mennoz broadel.

Arak kinnig ur vennoziadeg resis a-fet hon diorreidigezh istorel e fell din kemer da skouer ul lodenn all eus ar sevenadur, hini ar yezh hag al lennegezh, peogwir eo anavezet gwelloc'h gant an holl ar stourm evit ar yezh, ha peogwir ivez ez eo heverk-kenan ar pezh a zo bet sevenet abaoe ur c'hantved war an dachenn-se. Diaesterioù un emsav a zo koustus alies, safar ha kabouilh un toulladig meskerion ouzhpenn, a zo a-

walc'h a-wezhioù evit digalonkaat stourmerion c'hredus a labour atav en digenvez hag e-kreiz diseblanted an engroezioù. Ar stourmerion-se ne veizont ket atav an trec'hioù gwirion ha padus a zo bet gounezet ha neuze e tecont da soñjal ne vo biken tu da seveniñ netra a zoare gant o c'henvroiz. Ha padal, ar c'hontrol a zo gwir. Abaoe amzer AR GONIDEG ha KERVARKER da skouer, o deus ar Vrezhonez diskoulmet ar c'hud-ennoù pennañ ha sevenet ul labour ramzel.

Mat eo kounaat e pe stad e oa ar yezh e derou an 19vet kantved. Abaoe kantvedoù e oa pep soñj uhel e galleg er vro-mañ. Ar ouiziegezh, ar preder, an darempredoù uhel, ar c'henwerzh hag ar Mererezh-Stad, a oa etre dacuarn ar C'hallaoued, da lavarout eo e galleg. Erasañ preder ar renerion-se a zo bet heñvelaat mui-ouzh-mui Breizh ouzh Bro-C'hall ha distruj kement diforc'h yezhel, speredel pe meradurel etre an div vro. N'eo ket souezhus eta n'en defe graet ar brezhoneg nemet paouraat ha displeberañ abaoe alcubadegoù an Normaned, rannyezhekaat hag izelaat e pep keñver goude, e-pad m'en em ziframme unded ar vro dindan ar roused hag ar republikoù estren. O prientiñ marv ar brezhoneg e oa ur yezh veur hag aloubus, dezhi ur reizhskrivadur unvan, ul lennegezh uhel

hag ur geriadur siciantel ramzel. Ar vrogarourion avat n'int ket chomet da c'hortoz. Tud evel AR GONIDEG, KERVARKER pe MILIN, FRANSEZ VALLEE pe MEVEN MORDIERN hag ar re bodet endro dezho ne oant nemet un dornadig tud dic'halloud er gevredigezh. Ganto e oa evit o digoll gwellañ perzhioù ar reizh hag ar youl, ha dremmet o deus hep termal ouzh al labour da seveniñ. Lavaret e vo o deus foranet kalz amzer o tastum gerioù e-touez tud ar bobl, o reizhañ hag o krouiñ gerioù nevez, met ne oa ket tu dezho da ober a-hend-all, ha n'eo ket bet amzer gollet o strivoù. Gouest eo bet an dud-se d'en em glevout war ar c'hrefen dicesañ he deus ur vro da ziskoulmañ war hent an adsav : unvanidigezh ar yezh vroadel ha stummidigezh ur yezh lennek. Gant skol Walarn hag Al Liamm ez eo bet peur-unvanet ar yezh ha krouet ul lennegezh uhel e c'hell talvezout da ziazez evit stummañ ar remziadoù da zont. An holl emglevioù-se hag al labourioù sevenet a zo skouerioù heverk eus spered embregiñ ar Vrezhonez er mare-mañ. Kaset eo bet al labourioù-se da benn e-touez tabutoù hegasus a-berzh tud berrwel ha hep skoazell ur gouarnamant pe un aozadur stadel bennak evit divizout ur genurzh padus. Rouez eo ar broioù deuet a-benn da unvaniñ o yezh ha da sevel ul lennegezh uhel

e-kreiz diaesterioù heñvel. Hogen Breizhiz a zo deuet a-benn evelato da virout kenetrezo an urzh divizet ha da lakat da c'hwitaf an eil war-lerc'h eben ar strivadennou awenet evit dizarbenn o goundoù.

Tu zo bremañ da brederiañ war ar stourm-se evit ar yezh, ha da glask kompren penaos o deus gallet ar sturyezhourion dibredañ diouzh an dizurzh. Klask a ran reiñ d'ar strivoù-se ur framm-studi a c'hellou talvezout ivez evit kudennoù all.

Da gentañ o deus klasket ar stourmerion frammañ ar yezh a oa displeberet, en ur reizhañ an doare-skrivañ, en ur as-talvouddekaat ar gerioù a orin keltiek diwar goust ar gerioù gallek silet diezhomm er yezh lennek, en ur ziazezañ reolennoù yezhadurel strizh. Da lavarout eo lakat urzh en ur zisteurel pezh a zo diezhomm.

Goude eo bet arveret ar reizhskrivadur hag ar yezhadur evel ar stern ret evit diorren ar yezh e pep keñver. Adwelet eo bet an troioù-lavar rannyezhele, ar gerioù poblek, an testennoù kozh, evit pinvidikaat gallusteroù ar brezhoneg ha krouiñ ur yezh lennegel ledan ha liesdoare. Ar reizhskrivadur en deus notreet an arackadennoù souezhus a zo deuet goude e studi ar yezh, ha se evit un abeg aes-kenan da gompren ; ur

wezh tennet digant ar skrivagnerion pep aotre da emellout e skrivadur ar gerioù eo bet ret dezho ober traoù uheloc'h, peurgetket sevel skridoù, pe chom dilabour. Al labour amañ a zo bet eta pinvidikaat ar yezh e pep keñver en ur vont d'ar skridoù kozh, d'an testennoù damankounac'haet, d'an dud a bep renkad er gevredigezh vrezhon.

Hogen, n'eus bet tu da frammañ ar yezh evel-se ha d'he diorren nemet peogwir e oa bet dibabet ur pal : ober eus ar brezhoneg benveg meizañ ha diorren ar vro a-bezh, advrezhonekaat eta ar gevredigezh e Breizh penn-da-benn. Ar pal-se end-eeun en deus dibredet ar brezhoneg diouzh geunioù ar rannvroelerezh hag an trefoedachoù.

o  
o o

Ma tizezomp bremañ ar yezh hag al lennegezh evit studiañ an istor hag ar politikerezh, e c'hellomp arverañ an hevelep heuliad kudennoù :

Da gentañ e keomp gant kudem an uhelvennad breizhat evel preder ha stourm, da lavarout eo evel un dibab personel

a-zivout emskiantidigezh un hengoun a zo da lakaat anat ivez d'ar re all. Kentañ tra hon eus da ober eta eo magañ an uhelvennoù-se dre gement tra yac'haus a c'hellomp kavout e hengoun istorel Breizh. Amañ e c'heller ober meur a evezh-izadem. Soudiz e kavan atav pegen marnoniek e hañval bezañ Breizhiz pa'e eus keloù eus studiañ istor ar broioù estren, ha pegen nebeut a-bouez e roont da studi istor o bro. Ha pa studiont istor o bro e ra diouer dezho an hentenoù boutinañ a c'hellfe o lakaat da brederiañ gant frouezh war enkadennoù Breizh. Kregiñ a reer da skouer gant studi ar Gelted kozh. Hogen, un diwriziennadur e c'hell bezañ ivez reiñ re a bouez d'an amzerioù koshañ. Talvoudusoc'h eo hep mar istor ar Vrezhoned hag an emsav. Ret eo eta loc'hañ diouzh an amzer vremañ, diouzh al levrioù istor, an istorourion vroadel evel LA BORDERIE pe BELTRAM AN ARC'HANTREG, diouzh an testennoù deuet betek ennomp evit klask ur weledigezh wirion eus tonkadur Breizh. Gwelomp da skouer pezh a zo bet graet a-raok an Dispac'h gall. Soñjal a ran amañ dreist-holl en dielloù ha skridoù a bep seurt dastumet a-hed ar XVI-XVII ha XVIIIvet kantved gant hol lezennourion. Elastret e oa bet armeoù Breizh ha distrujet an nerzh broadel. Ne chome ken evit en em zifenn

nemet mouezh ar gwir pe ar gwirioù. Dirak ur galloud impal-aerel war emastenn, evel hini Bro-C'hall ne oa ket tu da ober a-hend-all. Difennoù Breizh o deus renet e-pad tri c'hantved ur stourm diaes ha diehan, o kilañ kammed goude kammed, oc'h adkemer raktal pezh a c'hellent. Ur stourm arabadus, met talvoudus kentañ. Evit-se o deus klasket dalc'h-mat harp war an dielloù koshoc'h, o tastum deiz goude deiz kement tra a c'hellent enebiañ ouzh drouke'hoantoù ar C'hallaoued. O vezañ ma oa prest atav an enebourion da nac'h talvoudegezh an dielloù-se, e c'heller lavarout ez int bet urzhiet ha korvoet en un doare skiantel ha koulz lavarout direbech dirak an istorourion. Figusoc'h e oa sur-mat kargidi roue Bro-C'hall evit degemer bevennoù d'o skraperezh, eget forzh petore gouizieg dinoad war an istor. An dielloù-se eta a zo bet dastumet aketus kentañ gant ar Vrezhoned, ha barnet didruez gant gwashoc'h eget istorourion, gant enebourion desket o doa gounid da dennañ diouzh tamall kement testen arvarus : an arguzennoù-mañ a zo a-bouez evit prouañ talvoudegezh ar skridoù a fell din menegiñ. Setu perak ivez ez eo ken uhel kelennadurezh an tabutoù savet e Breujoù Breizh a-enep da c'houarnourion ar roue er vro. Hon tud a lezenn o deus

bet kalz levezon war emdroadur ar gwir, zoken e Bro-C'hall hag e Europa a-bezh, a-raok an Dispac'h gall, met n'eo ket hep abeg.

E skridoù ar c'hantvedoù-se eta e kaver hogos kement tra a zo deuet eus ar c'hantvedoù tremenet. O studiañ e brezhoneg a zo un dra ret. Soñjal a ran e DOM LOBINEAU "Histoire de Bretagne", dreist-holl er prouennoù degaset gantañ, anezho dielloù talvoudus kenañ; DOM MORICE "Mémoires pour servir de preuves à l'Histoire de Bretagne", Paris, 1742-1746, 3 levrenn in-f°. al levrioù-se a zo pouezusañ dastumad dielloù istorel deuet betek ennomp. Diouzhtu e welomp pebezh mengleuzioù hon eus aze. Evit tabutoù Breujoù Breizh pe ar Parlamant ez eo heñvel. Dindan komzoù alies neuziet hegarat ez eus ur youl pennek da zifenn pe da adsevel ar vroadelezh. Ar skridoù-se a zo alies da lakaat war memes renk ha re "Breiz Atao" pe "Ar Vro".

Koulskoude an holl skridoù-se a zo e galleg pe dost. Merzhout a reomp neuze an torr kantvedel a zo bet en hon unded broadel. Kompren a reomp ivez n'hon eus pare ebet da c'hortoz nemet dre zerc'hel d'ar stourm brezhonek ha d'an

hengoun broadel war un dro. Kement-mañ avat ne vo unvanet da vat nemet o vrezhonekaat an hengoun-se a zo evit al lod-enn vrasañ fetisaet e testennoù gallek. An dra mallusañ hon eus da ober eta eo brezhonekaat ar studioù politikel hag istorel. Dicuizh ar studioù-se e savo raktal ur spered politikel gwirion e Breizh. Pa vo pledet a-zevri ouzhpenn gant enkadenoù a-vremañ ar gevredigezh e savo ivez un nerzh gouest da sammañ ezhommoù an emsav hag holl renkadoù ar bobl vrezhon.

N'eo ket a-walc'h avat magañ an uhelvennad breizhat. Ret eo c'hoazh frammañ an emsav a-benn lieskementiñ frouezh-usted ar strivoù graet gant ar stourmerion. O vezañ m'en deus pep ensavadur denel ur pal mui pe vui politikel, anzavet pe dianzav, eo ret distreiñ war vennozioù MEVEN MORDIERN ha tud ar sevenadur "dibolitikel".

Tud ar yezh hag al lennegezh, pe tud ar sevenadur evel ma veze lavaret neuze n'o doa ket ar memes mennozioù dre vras a-zivout an hent politikel; alies zoken n'o doa mennoziadeg resis ebet a-fet dezont ar brezhoneg pe an hentennoù evit diogelñ amzer da zont ar vro. Evit spisat an troc'h-se etre tud ar yezh ha tud an istor da skouer ez eo talvoudus distreiñ war vennozioù MEVEN MORDIERN. Hemañ en deus treuz-komprenet atav ar meizad seveniñ. Evitañ ne c'heller bevañ war an douar-mañ nemet diwar goust ar re-all. Setu perak ivez e komz kement eus Lezenn ar Bed e "Sketla Segobroni" hag eus an taol a vrev hag a flastr e "Talar an Hoc'h". Pa brederier un tamm e weler e laka orin ar sevenadur e trec'h an nerzh, met ne zeu morse a-benn da spisat eus pelec'h e teu an nerzh-se. Anat eo ne wel ket ez eo pep nerzh un dra speredel da gentañ; pezh a anver "galloud an arc'hant" zoken ne guzh goude holl nemet youl vat pe fall an dud o ren. Evit gwir, ne ra ket MEVEN MORDIERN kalz diforc'h etre an den hag al loen. Al loen ne c'hell bevañ nemet o perc'hennañ un tared a zo ret dezhañ difenn pe mont da get. An tared-

se en deus atav ur gorread a gemm hervez al loened, hogen, lakant a ra kement-se ne c'hell ket loened ur ouenn da skouer en em liesaat betek re war an douar-mañ. Al loened ne ziskoulm-ont ket ar gudenn-se, ne drehontont ket o ezhommoù pemdiek, nag an amzer nag an egor; ne sevenont netra ha n'o deus istor ebet peogwir ne gemeront perzh gwirion ebet e diskoulm o enkadennoù. An den gouez ken karet gant MEVEN MORDIERN, pe an den-meur ijinat gentañ evel un dizoloer broioù a zo damheñvel ouzh al loen. Digenvez eo, aon dezhañ atav da gejañ gant tud all, dreist-holl gant tud ar c'hêrioù. MEVEN MORDIERN n'en deus morse komprenet ez eo relijiel, da lavarout eo speredel, orin ar c'hêrioù hag ar c'hêriekant abaoe an amzerioù koshañ. Ar garantez a vage ouzh ar skiantoù-natur a zo bet un digoll evit e zicnaoudegezh eus kudennoù donoc'h, evel kudennoù ar vroad hag an istor politikel. Doust d'e labourioù ken talvoudus a-hend-all ha d'e uhelvennad a-zivout ar brezhoneg n'eo morse deuet a-benn MEVEN MORDIERN da zisplegañ ne c'hell an den en em ziorren nemet dre berc'hennañ gant tud all taredoù meizel pe egoroù speredel a zo frouezh ur c'hendiviz. Er c'hendiviz-se en em sevena an den evel boud kedvuhezal hag e framm ar geoded. Frammañ ar geoded a zo ober politikerezh,

pezh a zo pec'hed evit MEVEN MORDIERN.

N'eo ket chomet evelato ar Vrezhonad da c'hortoz ma vo adsavet ar yezh kent plediñ gant kudennoù diaesañ ar gevredigezh. Gant ar Strollad Broadus Breiz hag ar gazetenn "Breiz Dishual" da gentañ, gant ar Strollad Broadel hag ar gazetenn "Breiz Ateo" diwezhatoc'h eo bet spisaet ar mennozioù politikel : dieubidigezh Vreizh ha diazezidigezh ur Stad Vrezhon. Met diglok a-walc'h eo chomet ar mennozioù a-zivout hentenoù ar stourm ha framm ar Stad da adsevel. Un nevezinti bras int bet evelato peogwir o deus roet ur pal resis d'an Emsav, dreist-holl goude an disrann e 1931 etre broadelourion ha kevrendelourion. Tamm ha tamm eo bet komprenet pegen didalvoud eo goulenn an dieubidigezh e-lec'h prientiñ a-zevri an nozadurioù-Stad a ziskoulmo ar gudenn. Reizh eo eta ar striv graet e miz Eost 1940 e Pontivi gant Kuzul Broadel Breizh peogwir e tiskouez dres e oa gouest Brezhoned zo da empennañ ur framm resis hag hollek evit ar vro. C'hwitet en deus ar striv-se en abeg da enebiezh an Alamaned a zo en em zalc'het e Breizh heñvel a-walc'h ouzh ar C'hallaoued. E-pad ar brezel en deus kendalc'het an emsav da ober bruderezh etouez ar bobl a-bezh met buan eo kouezhet warnañ an heskin-

erezh ha kaset eo bet koulz lavarout da get goude ar brezel.

Aes e vefe studiañ al lennegezh eus ar bloavezhioù du evit gwelout pegen don e oa en em silet an digalonkaat e speredoù an dud. N'eo ket bet peurlvouget evelato ar spered breizhat peogwir en deus kendalc'het ar barzh da ganañ :

"War gribennoù meinek ar menezioù du-hont  
E red un alan a becc'h peurbadus.  
War werc'hded an erc'hegi digenvez  
E kan, mibin he zreid, an Awen vlim, o korolliañ."  
M. GLANNDOUR "Milc'hwid ar Serr-noz" p.9

Goude an distruj, al lazhadegoù, ar prosezioù a bep doare hag ar spouron eo'h adkrog ar re yaouank gant hentoù ar vro :

"Deomp-ni eo bremañ, deomp, bugale an dic'hoanag,  
"adsevel ar banniel hag adkregiñ er stourm. Ha, 'm eus aon,  
"n'hon eus graet betek-hen nemet klask hon hent. Barzhonegoù  
"a zo bet savet : hini anezho avat ne verko derou ur mare  
"evel m'en deus graet Firc'hirin ar Mor. Dre n'hon eus ket  
"kredet c'hoazh lavarout ar pezh hon eus e gwirionez da lav-  
"arcut. Dre n'hon eus ket kredet bezañ, evel barzhead, testoù  
"hor pobl..."

P. DENEZ "Al Liamm" 1953 Niv.41 p.13

Kement-se a zo bet skrivet er bloavezhioù diaesañ, pa oa aet da get emsav Breiz Ateo ha Gwalarn, ha pa ne oa ket krog c'hoazh labour ar strollad bodet en dro d'Al Liamm da

zougen frouezh. Kavet e vefe testennoù all o tiskouez kriz-der ar mare-se, met daoust da bep tra, en ur stourm youlek a zo bet ur burzhuñ pemdeziek, en deus ar breizhad sevenet e vout don ha buan o deus adarre ar strivoù douget frouezh. Pa seller a-dost ouzh dastumadenn Al Liamm da skouer e weler ur c'hemm bras deuet el lennegezh vreizhat. Anat eo dreist-holl pa gēverier danevelloù-berr YOUENN OLIER gant kontadennoù JAKEZ RIOU. Hemañ a zeskriev deomp tud ar maezioù gant o zrubuilhoù a dud wasket. YOUENN OLIER a ro deomp da anavezout anken tud a oar ez int gwasket direizh hag a fell dezho adsevel. Setu perak eo kalz krisoc'h o foanioù. Gant tud YOUENN OLIER ez eus atav ur goulenn : pegoula ? YOUENN OLIER e-unan en deus klasket reiñ ur respont d'ar goulenn-se en ur ziskouez un hent en e skridoù politikel. Kalon a-walc'h en deus bet evit barn an emgav etrevroadel hag ar mennozioù breizhek en un doare spiswel. O tiskouez arvar ar stourm o deus talvezet e varnadennoù da zistrobañ an emsav diouzh an dibaboù touellus hag ar gounidoù faos. A-hed e evezhiadennoù e prou YOUENN OLIER ne c'hell Breizh nemet dibab an hent diues, hini an adsav broadel, evit ober berzh. A-hend-all e vo peurrivinet en un dismantr a vo kalz koustus-

oc'h eget ar stourm hag an trec'h. Plijet pe get, ne c'hell ar Vrezhoned nemet seveniñ o zonkadur. Hon sevenadur a zo neuze ar pezh a sevenomp, an doare ma respontomp d'hor galvidigezh a bobl. Hogen, un dra a zo bet lakaet diarvar en emsav abaoe an eil brezel-bed : ne c'hell ar Vrezhoned padout evel pobl, ha bleuniañ en amzer da zont nemet dindan goudor ur Stad Vrezhon. Koulskoude n'eo ket savet ar Stad-se c'hoazh ha skoilhoù bras a chom war an hent. Gwelloc'h eo lezel a-gostez ar skoilhoù estren n'hon eus krog ebet warno evit ar mare ha studiañ spisoc'h ar skoilhoù a denn d'ar Vrezhoned o-unan.

Da gentañ eo ret menegiñ an niver bihan a dud spiswel ha kalonek a-walc'h evit stourm e-sell d'ar pal-se ha diouzh ret henn anzav sklaer. Renerion an emsav sevenadurel da skouer ne voent ket ken niverus-se o tifenn ar yezh vroadel dres pa oa tud all o klask lakaat en arvar hec'h unvanidigezh. Koulskoude niver an dud-se a dle kreskiñ, evel ma tle kreskiñ ivez niver an dud stummet evit an holl labourioù a zo da seveniñ er vro war bep tachenn. N'eo ket a-walc'h avat d'ar stourmerion bezañ niverus ha frammet mat etrezo evit kas an emsav d'e zisoc'h reizh, fellout a ra din lavarout ar Stad

Vrezhon. Hag amañ e keomp gant eil skoilh an emsav, an hini grevusañ er mare-mañ moarvat : n'eo ket boas an emsaverion dedennet gant ar stourm politikel da blediñ gant kudennoù hollek ar vro. Fellout a ra din spisaat e trofent aes a-walc'h da stourm hepken evit ur renkad eus ar gevredigezh pe ur ramgredenn bolitikel bennak e-lec'h sammañ enkadennoù ar gevredigezh vrezhon a-bezh. Evit pareañ diouzh seurt kleñved gouest da bulluc'hañ emsav politikel ar vro-mañ n'eo deus ar stourmerion nemet ur remed a roio ur ster d'o strivoù, evel diwezhatoc'h da strivoù ar Stad Vrezhon : mont d'ar gwirvoud brezhon. N'eo nemet er c'hendiviz gant ezhommoù hag enkadennoù ar Vrezhonek e c'hello an emsaverion politikel diorren ur preder hag ur geennadurezh ef'edus, pezh ne vo biken tu da sevel diwar gealioù difetis tennet diouzh deguezhioù estren. Kement-se a lavar n'eo devo morse echu an emsaverion da studiañ pinvidigezhioù al lennegezh vrezhonek, darvoudoù istor Breizh, an arzoù, an douaroniezh dre weladenniñ ar c'hornbroioù evit en em ober diouzh ar vro, ar skridoù politikel brezhon, an armerzh gant strivoù ar gouerion da skouer, ha dreist-holl tud ar bobl-mañ, gant o zemb-spered, o emzalc'h, o goanagoù hag o zrivlidoù, da lavarout eo kement

tra a ro un dremm da Vreizh. Ar re n'int ket gouest d'en em wriziennañ evel-se en hengounioù brezhon na d'o adperc'hennañ da vat ne vo morse diogel o spered broadel ha n'eo ket warno e c'hello ar Stad Vrezhon diazezañhe surentez. Ret eo eta diwall diouzh an diskoulmoù iskis rak labour pep Stad a zo plediñ bemdez gant kudennoù hollek ha boutin : ouzh al Labour-se e tle an emsaverion politikel en em vozañ.

Evit klozañ e lavarin emomp pell c'hozh diouzh anavezout istor gwirion ar vro-mañ. Ar studioù istorel e galleg a zo aet da get er skolveur hag an emsav brezhonek en deus kresket evit lod en ur ankounac'haat istor Breizh. Un arcuez a yec'hed eo gwelout er bloavezhioù-mañ niver ar pennadoù gouestlet da studi an istor o pactaat e brezhoneg. Diouzh ar studioù-se e savo e Breizh ur spered politikel nevez gouest da ziorren an emsav ha da gas anezhañ d'an trec'h.

))o((

G I B T I E N N E

ISDIORREADUR HA BREDONIEZH

Breizh n'he deus lec'h ebet koulz lavarout en istor kempredel. Un elfenn a isdiorreadur eo se moarvat. Va c'henn-eiled o deus he studiet en o displegadennoù.

Va c'hefridi eo studiañ an isdiorreadur politikel-se e-keñver bredoniezh. Ar goulemm a lakaan eo hemañ : pe zi-forc'h zo etre bred ur bobl a gemer perzh oberiant en istor ha bred ur bobl n'he deus ket he lec'h en istor he mare ?

Ar studienn-mañ n'eo ket frouezh un enklask hentennac'ek. Ur strobad prederiadennoù ez eus anezhi kentoc'h. Betek-henn, pa'm eus bet tro da embann notennoù em eus pledet dreist-holl gant ar yezh, gant pouezuster ar yezh evit diorreadur ar bred. Hiziv avat e klaskin lakaat a-wel pouezuster an istor, pe ent-resisoc'h ar bezañ en istor, evit yec'hed bred ur bobl.

Ranket em eus ober un dibab e-touez va notennoù. D daou rumm em eus o renket. Ar re a denne d'ar bred evel lec'h an anaout. Ar re a denne d'ar bred evel lec'h ar frammañ. A-benn ar fin eo bet dav din lezel a-gostez an eil rumm, - re verr eo an amzer, - ha lakaat ar rumm notennoù kentañ e stumm un displegadenn.

- En ur pennad kentañ e striven da dermenañ an div c'herienn "bezañ en istor", bezañ er-maez eus an istor pe gentoc'h "bezañ en anistor"; penaos e c'haller mont er-maez eus an istor; reiñ a ran skouer soudarded vrezhon brezel 14 evel skouer tud oc'h emgannañ en anistor;

- termenañ a ran ar stad a isdiorreadur bredoniell istorek, pe stad a zizeriadur, evel stad anistorek;

- en ur pennad da heul e studien an tremen eus ar stad anistorek d'ar stad istorek; penaos e c'hell ur bobl kouezhet er-maez eus an istor sevel en istor en-dro.

- degouezhout a reomp dre-se gant kudem an Emsav; a-raok avat e klaskan termenañ petra eo un darvoud istorek rik hag un darvoud brizhistorek dre geñveriañ daou zarvoud kempredel eus istor Breizh (tarzhadenn monumant Roazhon, tagadenn isprefeti Montroulez); e-ser an div skouer-se e fell din termenañ anien an darvoud istorek;

- en ur pennad all e klaskan termenañ kefridi an Emsav ha merkañ ur roll labour dezhañ evit ar bloavezhioù o tont;

- evit klozañ e lakaat a-wel unan eus dañjeroù brasañ

a zo war an Emsav : kemer diazez war mojennoù ar stad anistorek, e-lec'h lakaat hon holl aked da furmiñ an darvoudoù a lakay hor bro en istor ha dre-se en he rezid.

Daou zoare zo evit ur bobl da anaout ar bed. Anaout ar bed dre gemer perzh oberiant en e zarvoudoù. Anaout ar bed hep kemer perzh, o c'houzañv darvoudoù buhez ar bobloù all. Bezañ furmerez darvoudoù, pe vezañ danvez hepken d'an darvoudoù furmet gant ar bobloù all.

Disheñvel-bras eo an daou zoare-anaout-se. Krediñ a rafed a-walc'h, in abstracto, o devez an darvoudoù an hevelep ster dre vras evit an holl, ha dre-se, kemer perzh enno pe na gemer perzh zo goude-holl un afer a zegouezh, a nebut a bouez; ken na c'halle ur bobl dibab bewezh mont e-barzh pe chom er-maez diouzh ma kavo mat. Ur fazi bras eo krediñ kement-se. Gwelout a raimp n'eo ket an Istor ur c'hastell digor d'an holl, darev da zegemerout en-dro pa garont ar re a zo aet er-maez; heñvel eo kentoc'h ouzh ar c'hastell burzhudus-se a reer anv en hor c'hontadennoù na gaver ket aes an nor anezhañ, hag ouzhpenn-se a ya diwar wel a-greiz-holl evel un touell. Ur bobl a gemer perzh oberiant en istor, hag ur bobl a c'houzañv hepken an darvoudoù zo ken estren an eil d'eben ha pa vijent o vevañ war blanedennoù disheñvel.

Met penaos e c'haller mont er-maez eus an istor ? Un devoud paot-kenan eo, liesfurm, o tizhout kenkoulz an hini- ennoù hag ar bobloù. Anavezet eo ar merc'hed a gouezh en devosion goude pemont vloaz : kentoc'h eget anaout ar gozhni

Ranket em eus ober un dibab e-touez va notennoù. E daou rumm em eus o renket. Ar re a denne d'ar bred evel lec'h an anaout. Ar re a denne d'ar bred evel lec'h ar frammañ. A-benn ar fin eo bet dav din lezel a-gostez an eil rumm, - re verr eo an amzer, - ha lakaat ar rumm notennoù kentañ e stumm un displegadenn.

- En ur pennad kentañ e strivan da dermenañ an div c'herienn "bezañ en istor", bezañ er-maez eus an istor pe gentoc'h "bezañ en anistor"; penaos e c'haller mont er-maez eus an istor; reiñ a ran skouer soudarded vrezhon brezel 14 evel skouer tud oc'h emgannañ en anistor;

- termenañ a ran ar stad a isdioreadur bredoniel istorek, pe stad a zizeriadur, evel stad anistorek;

- en ur pennad da heul e studian an tremen eus ar stad anistorek d'ar stad istorek; penaos e c'hell ur bobl kouezhet er-maez eus an istor sevel en istor en-dro.

- degouezhout a reomp dre-se gant kudenn an Emsav; a-raok avat e klaskan termenañ petra eo un darvoud istorek rik hag un darvoud brizhistorek dre gefveriañ daou zarvoud kempredel eus istor Breizh (tarzhadenn monumant Roazhon, tagadenn isprefeti Montroulez); e-ser an div skouer-se e fell din termenañ anien an darvoud istorek;

- en ur pennad all e klaskan termenañ kefridi an Emsav ha merkañ ur roll labour dezhañ evit ar bloavezhioù o tont;

- evit klozañ e lakaat a-wel unan eus dañjeroù brasañ

a zo war an Emsav : kemer diazez war mojennoù ar stad anistorek, e-lec'h lakaat hon holl aked da furniñ an darvoudoù a lakay hor bro en istor ha dre-se en he rezid.

Daou zoare zo evit ur bobl da anaout ar bed. Anaout ar bed dre gemer perzh oberiant en e zarvoudoù. Anaout ar bed hep kemer perzh, o c'houzañv darvoudoù buhez ar bobloù all. Bezañ furmerez darvoudoù, pe vezañ danvez hepken d'an darvoudoù furmet gant ar bobloù all.

Disheñvel-bras eo an daou zoare-anaout-se. Krediñ a rafed a-walc'h, in abstracto, o devez an darvoudoù an hevelep ster dre vras evit an holl, ha dre-se, kemer perzh enno pe na gemer perzh zo goude-holl un afer a zegouezh, a nebeut a bouez; ken na c'hallo ur bobl dibab bewezh mont e-barzh pe chom er-maez diouzh ma kavo mat. Ur fazi bras eo krediñ kement-se. Gwelout a raimp n'eo ket an Istor ur c'hastell digor d'an holl, darev da zegemerout en-dro pe garont ar re a zo aet er-maez; heñvel eo kentoc'h ouzh ar c'hastell burzhudus-se a reer anv en hor c'hontadennoù na gaver ket aes an nor anezhañ, hag ouzhpenn-se a ya diwar wel a-greiz-holl evel un touell. Ur bobl a gemer perzh oberiant en istor, hag ur bobl a c'houzañv hepken an darvoudoù zo ken estren an eil d'eben ha pe vijent o vevañ war bladennoù disheñvel.

Met penaos e c'haller mont er-maez eus an istor ? Un devoud paot-kenan eo, liesfurm, o tizhout kenkoula an hini- ennoù hag ar bobloù. Anavezet eo ar merc'hed a gouezh en devoision goude pemont vloaz : kentoc'h eget anaout ar gozhi

hag ar marv o tont, e tibabont en em zallañ gant rambread-  
 ennoù a beurbañlezh, hag e tec'hont eus an istor evit kavout  
 repu en ur vrizh-kravez. Pa'n em gaver gwasket gant ur redi  
 garv, kentoc'h eget e anavezout evit ar pezh ez eo, e kaver  
 a-wezhioù gwella kemmñ framm ar bred, treuzframmañ ar bred,  
 en doare ma chomo dianavezet gant ar bred nevez ar redi na  
 c'halle ket gouzav ar bred kozh. En ur ober-se avat, e koller  
 an anaout istorek, an hini end-eeun a ziskoueze ar redi, ha  
 dre goll an anaout istorek e koller pep gallout istorek : ne  
 enavezet mui d'an darvoudoù nemet ar ster brizh-kravezel  
 mojennek, pe all, en ur ger : anistorek. Eil heuliad : ar  
 redi a nac'her anaout zo an abeg gwirion d'an treuzframmañ  
 bred a sevever evit e zianaout; menel a ra er bred nevez  
 evel al lezenn nac'hel anezhañ, an ifern anezhañ a laosk e  
 dasantoù d'e wallhentiñ : c'hwez an ankou zo gant peurbadel-  
 ezh ar vigodez. Met n'eo ket hepken er gravez e klasker repu.  
 Anavezet eo ar plac'hed yaouank a goll o ilboued ha dre-se  
 a vir ouzh o c'horf a emdreiñ kentoc'h eget sammañ roll ar  
 vaouez emaint o vont da vezañ; ar re-se a dec'h diouzh an  
 istor evit klask repu er c'hleñved. Anavezet eo ar bobloù a  
 zibab en em asotiñ gant moged ar vertuz hag an dlead kentoc'h  
 eget anaout emaint pleget dindan ur mac'homer; ar re-se a  
 dec'h diouzh an istor evit en em zouarañ er vrizhdivezouriezh<sup>(1)</sup>.

(1) Ar yec'hed n'eo ket hepken un dra hiniennel. Ar c'heñverioù  
 kemeret ouzh ar boudelezhioù hag an talvoudoù trahiniennel  
 evel an istor, ar vroadelezh, an denelezh a c'hall bezañ yac'h  
 pe gleñvedel. Er ster mezegelezh rik, bezañ en anistor zo un  
 neuroz. Mab-den n'en deus ket ar frankiz da zibab emellout en

Brizhkravez, neuroz, brizhdivezouriezh zo holl stummoù  
 eus ar pezh a c'haller envel an anistor. Da heul e c'haller  
 enebiñ an emzalc'hioù istorek hag an emzalc'hioù anistorek.  
 Daoust ma'z eo an isdiorreadur testenn an displegadenn-mañ,  
 e tremenin hep ober amañ gant an anv-gwan isdiorreet, o vezañ  
 ma'z eo ledanoc'h sterva ar ger-se, - hag e rin pobl dizeriat  
 eus ar bobl a ziskouez emzalc'hioù anistorek. Klask a rin  
 bremañ gwiriekaat perak, dre gemer end-eeun skouer Breizhiz.

Breizhiz dre vras o deus dibabet dianacout ar gaou a ra  
 dezho o destagerezh da Frañs; tec'hout a reont eus an istor,  
 ha war un dro eus o istor, evit kaout repu er mojennoù a  
 anavezomp holl : feal e felle dezho bezañ ouzh ar vamm-vro  
 vras he devoa teurvezet ober he bugale anezho (en o istor e  
 kaver kentoc'h skeudenn ur rouñvez wadus ha ganas a glaskas  
 e-pad kantvedoù d'o flaouiañ); ouzhpenn-se, merc'h henañ an  
 Iliz e oa ar vammvro-se evit reoù, kavell gwirioù an den evit  
 reoù all. Kentoc'h eget emouezañ fraezh ouzh un devoud eeun  
 hogen dic'houzavvadus : bezañ ur vro berc'hennet gant ur vro  
 all, ez int prest da zegemerout an holl vojennoù.

o

Evit spisaat bredoniezh Breizhiz ha dre-se bredoniezh  
 ar bobloù dizeriat, kemeromp ur skouer. Keñverioomp emzalc'h

istor pe chom er-maez. "Ne ran ket a bolitikerezh", ar frazenn-  
 se zo un azon neurozel. Ouzhpenn ma'z eo faos : an holl a ra  
 politikerezh, ha seul washoc'h eo ma'z eo hep rat.

soudarded Vreizh hag emzalc'h ar C'hallaoued e derou brezel  
14.

Ar C'hallaoued, evel an Alamaned, ar Saizon, a ouie perak e raent ar brezel-se; hag ar brezel, zoken mar en deus degaset heuliadoù dic'hortoz, zo chomet ar brezel mennet ganto. Mar lakaer e kemm an div zremm o devez bepred an darvoudoù : an dremm e wiskont evit an istor, hag an dremm a anavezaz dezho an dud o buhezas, e verzher e vez nebeut a ziforc'h etre dremm istorek ha dremm vuhezaz an darvoudoù evit ar re o renas. Evit ar bobloù gall, alaman, saoz, e voe ar brezel ur redi evel-reizh, hogen ur redi diabarzh, ur redi empleget gant o istor, degaset gant emdroadur an darvoudoù gall, alaman, saoz; ur redi leun a ster istorel, o tegas gantañ evel e heuliad reizh an dlead d'ober ar brezel.

Evit Breizhiz avat e teue ar brezel evel ur redi diavaez, eleze ur redi na gave na ster, nag abeg, na gwizienn ebet en o istor; kouezhañ a rae war o buhez evel ur walenn-natur. Kentoc'h avat eget dizarbenn ar walenn, kentoc'h eget respont da Frañs ne selle ket he brezel outo, e kavas gwell Breizhiz klask repu en ur vojenn a fealded. Tra ma kredent edont o skrivañ o anvioù gant o gwad war daolenoù an istor, e tec'h-ent eus an istor.

Tra ma kendalc'he ar C'hallaoued, an Alamaned, ar Saizon gant o istor, e oa skarzhet Breizhiz, torret ganto neudann o istor, hag argaset e voent d'an anistor, da sklavelezh an emzalc'hioù hep ster. Kaer o devoe o mistri ober harozed ha gouroned anezho, n'int ket bet renket etre an harozed hag

ar c'houroned gant an istor, - rak nepred ne zeu sklaved da vezañ gouroned en ur chom sklaved. An istor a reas gouroned en hevelep bloavezhioù, - daoust ma vezent roet evel treitourion gant ar mestr gall. Breizhiz Verdun, daoust d'o holl gadarned, zo bremañ evit an istor dizeridi kaset d'al lazadeg. Eoas e vezer da lavarout da heul Marx : "Ar broletaerion n'o deus ket a istor"; lavarout a o'hellomp, o tilezel an termen re strizh "proletaerion" : "An dizeridi n'o deus ket a istor". En anistor emaint, pa ne vezont ket furmerion an darvoudoù a vije o istor, pa ne vezont nemet an dervez ma furm gantañ ar bobloù all o istor dezho, ha pa glaskont repu en un emzalc'h mojennek o lez dall ouzh an darvoudoù ha dic'halloud a-grenn dirazo.

Mar galler enebiañ en un nebeut gerioù ar bobl zizeriat ouzh ar bobl en he rezid, e vo evel-henn :

Evit ar bobl en he rezid, e vez dremm vuhezaz an darvoudoù un dremm istorek, dre-se emañ an darvoudoù dindan he galloud. Meizañ a ra an darvoudoù evel hec'h istor o kenderc'hel, hag un heuliadur istorel a vez etrezo; n'eus troc'h ebet etre an darvoudoù o-unan, nag etrezo hag an istor diagent.

Evit ar bobl zizeriat, e vez dremm vuhezaz an darvoudoù un dremm anistorek, dre-se emañ an darvoudoù e-maez he galloud. Ne vez etrezo heuliadur istorel ebet a ve war un dro ul liamm eus he buhez; ne vez abegelezh na gwizienn ebet dezho en he buhez dezhi; ur redi diavaez n'int ken, hag azon an dizeriadur eo e vezont buhezaz ganti evel un tonkad anistorek.

Merkomp diouzhtu ur fazi. Hemañ : krediñ e lusk diouti hec'h-unan ar bobl zizeriat davit kemer en-dro ur vuhez istorek; evel unan bennak lakaet er-maez eus kastell an istor n'en deve paouez ken na ve deuet e-barzh en-dro : ne chom ket digor dor an istor a-dreñv an hini a ya er-maez; kastell an istor, evel kastell burzhudus hor c'hontadennoù, a steuz a-drek kein an hini en kuita, ha ken buan all e steuz eus e eñvor ivez. E-keñver bredoniezh ez eo ar stad anistorek ur stad stabiloc'h eget ar stad istorek, pa'z eo ur stad a enkil, paouroc'h enta ha frammet startoc'h. Ar bobl zizeriat hec'h-unan he deus dibabet bezañ en anistor, dindan wask ur redi spouronus moarvat, gant ur youl faezhiat hep mar, hogen gant he youl dezhi. Ur bredkleñvedour a lavarfe emañ en ur stad a neuroz. An neuroz zo anezhañ un emzalc'h faos, kedouezet evel faos gant ar c'hlañvour, hogen kedouezet ivez evel an emzalc'h bevus nemetañ.

Rak emzalc'h an den dizeriat a vez buhez et evel faos gantañ e-unan. Mar youc'h "Breizh atav !" ar Vrezhoned mezv, e ouzont ervat zoken war yun ez eo o lealded c'hall un emzalc'h hep diazez gwirion. Evel ma teu tasman an ankou da dristaat rambreadennoù peurbadelezh ar vigodez, e teu ivez tasman o dic'halloud istorek da wallhentañ askreoù repuidi an anistor. Bennozh d'an dic'halloud istorek ma oant kouezhet e c'hallas Frañs ober eus ar bobloù sujet ganti binvioù dispar d'he galloud : ne voe ket sentusoc'h terrorion dispac'h e Madagaskar eget Senegaliz; ne voe ket kadarnoc'h soudarded

war dalbennoù brezel 14 eget Breizhiz. Hogen an tasman a sav eus goueled ar bredoù a verk a-walc'h ne deo ket marv Arzhur. Emañ o hunvreal. Mat eo gouzout avat n'eo ket dioutañ e-unan e tihuno evit kemer penn e hent war-du kastell burzhudus an istor.

Emaomp o paouez envel ha brastresañ ar c'hleñved : an dizeriadur; da lavarout eo stad ar bobl a c'houzañv darvoudoù n'o deus nag abeg na gwirizenn en hec'h istor, na gemeront ket ster en hec'h istor; stad ar bobl a vez danvez gouzañvat istor ar re all hag a sell ouzh ar stad-se evel ur perzh eus he natur, hag a fram he buhez war an diazez naturel-se. Merket hon eus ez eo an dizeriadur kevatal da : bezañ en anistor. Termenet hon eus an anistor evel an dic'halloud da veizañ ul liamm etre an darvoudoù a c'houzañver hag ar vuhez a rener, da veizañ etre an darvoudoù o-unan ul liamm a ve war un dro ul liamm eus ar vuhez a rener; an anistor zo un anlec'hiañ : ar bobl en anistor n'he devez lec'h ebet dezhi en istor ar bed; ha darvoudoù istor ar bed ne gavont ivez lec'h ebet en hec'h istor dezhi.

Termenet ar c'hleñved, sellomp ouzh ar vezekniezh. Ar vezekniezh vat eo an hini a ro ar pare d'ar c'hlañvour, o tistrujañ ar c'hleñved, Mezekniezh dister an hini ne ra ken diverkañ azonoù ar c'hleñved, a douell ar c'hlañvour o komz outañ eus yec'hed pa oar emañ ar c'hleñved bepred aze.

o  
o o

Kerout a rafen keñveriañ daou zervoud c'hoarvezet e Breizh : tarzhadenn vonumant Roazhon, tagadenn isprefeti Montroulez. Pa darzhas monumant Roazhon, e kemeras diouzhtu an darvoud an hevelep ster evit an holl, Brezhoned ha Gall-aoued, ar ster end-eeun en doa evit aozerion an taol; dremm istorek an darvoud a oa kenster gant an dremm vuhez anezhañ; perak ? peogwir ne oa ket an darzhadenn-se ur "yezh" dianav da zen, "yezh" ma oa eus ar c'hendiviz bet renet e-pad 15 kantved etre Breizh ha Frañs. Darvoudoù istor ur bobl zo evel gerioù ur yezh; frazennoù disheñvel a vez "skrivet" ganto da bep kantved, hogen un dremm anavezet o devez adreuz da froud ar c'hantvedoù, ur ster anat o seniñ heñvel en askre pep remziad. Ar yezh vroadel hec'h-unan a c'hell bezañ steuziet abaoe kantvedoù, ul "lavar" all ez eus a chom gwirizennet er bobl e-pad pell c'hoazh; al "lavar" donoc'h-se ez eo an darvoudoù istorel ar "gerioù" anezhañ. Lavarout a reer boas : keit ha ma chom bev ar yezh, e c'haller gortoz un adsav d'ar vroad. Reishoc'h eo lavarout : ar yezh vroadel a c'hell steuziañ evel yezh komzet, keit ha ma chom bezant er bobl al "lavar" istorek, zoken diemouez ha morvitellet-don, e chom un dazont d'ar bobl. Al "lavar" istorek zo ar framm ma c'hallo diorren he zonkad en-dro. Tarzhadenn Roazhon a voe evit an holl evel ur frazenn distaget fraezh en ur "yezh" anavezet mat, eviti da vezañ bet diglevet abaoe pell.

Hag an holl a veizas fraezh ar ster anezhi, ar C'hallaoued gant sebez ha konnar, ar Vretoned gant ur bomm a lorc'h hag a levenez na gomprenent ket re. Enno e kroge da fiñval evel un eñvor don na ouient ket e oa anezhañ. Hag ar baotred a reas an taol a oa ivez dres oc'h adkavout ur "yezh" kozh na ouient ket moarvat en hec'h anavezet ken mat. Tagadenn isprefeti Montroulez en enep, a chomas dispis ha forc'hellek ar ster anezhi. An emskiant vrezhon a glaskas anavezout warni un dremm donkadek vrezhon, hep dont a-benn. Mar boe tarzhadenn Roazhon ur frazenn fraezh, e chomas tagadenn Montroulez ur valbouzadenn dispis. Ar C'hallaoued diouz o zu, a glaskas lakaat war daol Montroulez liv un darvoud kevredigezhel gall, hag e teujont a-benn betek ur poent; hogen evito e oa ur valbouzadenn gevredigezhel ivez : tra aes e voe dezho ober goap anezhi; ha koulskoude e vanjont nervernek en abeg d'an taol-mouezh brezhon a dregerne ganti. Disheñvel e vije bet o emzalc'h, evel ivez emzalc'h an argaderion, mar bije c'hoarvezet an traoù e Compiègne pe en Orléans.

Ur bobl zizeriat zo enta ur bobl na vez ket ken evit distagañ "lavar" hec'h istor. Pa lavarer istor e komprener peurliesañ studi an istor. Un dra all zo da gompren. Pa lavarer yezh ne komprener ket dre ret studi ar yezh. Intent a reer da gentañ an eztaolñ pemdeziek a ra steuenn ar vuhez; kemmus ha nevez bemdez an dremmelioù anezhi, padus ha diazezet-mat ar framm hag ar furmoù anezhi. Un diforc'h heñvel zo d'ober e-keñver an istor : pa lavaromp istor e tleomp kompren da gentañ ivez un eztaolñ pemdeziek a ra steuenn ar vuhez, pe, evel ma

o  
o o

Karout a rafen keñveriañ daou zervoud c'hoarvezet e Breizh : tarzhadenn vonumant Roazhon, tagadenn isprefeti Montroulez. Pa darzhas monumant Roazhon, e kemeras diouzhtu an darvoud an hevelep ster evit an holl, Brezhoned ha Gall-aoued, ar ster end-eeun en doa evit aozerion an taol; dremm istorek an darvoud a oa kenster gant an dremm vuhez anezhañ; perak ? peogwir ne oa ket an darzhadenn-se ur "yezh" dianav da zen, "yezh" ma oa eus ar c'hendiviz bet renet e-pad 15 kantved etre Breizh ha Frañs. Darvoudoù istor ur bobl zo evel gerioù ur yezh; frazennoù disheñvel a vez "skrivet" ganto da bep kantved, hogen un dremm anavezet o devez adreuz da froud ar c'hantvedoù, ur ster anat o seniñ heñvel en askre pep remziad. Ar yezh vroadel hec'h-unan a c'hell bezañ steuziet abaoe kantvedoù, ul "lavar" all ez eus a chom gwiziennet er bobl e-pad pell c'hoazh; al "lavar" donoc'h-se ez eo an darvoudoù istorel ar "gerioù" anezhañ. Lavarout a reer boas : keit ha ma chom bev ar yezh, e c'haller gortoz un adsav d'ar vroad. Reishoc'h eo lavarout : ar yezh vroadel a c'hell steuziañ evel yezh komzet, keit ha ma chom bezant er bobl al "lavar" istorek, zoken diemouez ha morvitellet-don, e chom un dazont d'ar bobl. Al "lavar" istorek zo ar framm ma c'halla diorren he zonkad en-dro. Tarzhadenn Roazhon a voe evit an holl evel ur frazenn distaget fraezh en ur "yezh" anavezet mat, eviti da vezañ bet diglevet abaoe pell.

-----  
etienne

Hag an holl a veizas fraezh ar ster anezhi, ar C'hallaoued gant sebez ha konnar, ar Vretoned gant ur bomm a lorc'h hag a levez na gomprenent ket re. Enno e kroge da fivval evel un eñvor don na ouient ket e oa anezhañ. Hag ar baotred a reas an taol a oa ivez dres oc'h adkavout ur "yezh" kozh na ouient ket moarvat en hec'h anavezent ken mat. Tagadenn isprefeti Montroulez en enep, a chomas dispis ha forc'hellek ar ster anezhi. An emskiant vrezhon a glaskas anavezout warni un dremm donkadek vrezhon, hep dont a-benn. Mar boe tarzhadenn Roazhon ur frazenn fraezh, e chomas tagadenn Montroulez ur valbouzadenn dispis. Ar C'hallaoued diouzh o zu, a glaskas lakaat war daol Montroulez liv un darvoud kevredigezhel gall, hag e teujont a-benn betek ur poent; hogen evito e oa ur valbouzadenn gevredigezhel ivez : tra aes e voe dezho ober goap anezhi; ha koulskoude e vanjont nervernek en abeg d'an taol-mouezh brezhon a dregeme ganti. Disheñvel e vije bet o emzalc'h, evel ivez emzalc'h an argaderion, mar bije c'hoarvezet an traoù e Compiègne pe en Orléans.

Ur bobl zizariat zo enta ur bobl na vez ket ken evit distagañ "lavar" hec'h istor. Pa lavarer istor e komprener peurliesañ studi an istor. Un dra all zo da gompren. Pa lavarer yezh ne komprener ket dre ret studi ar yezh. Intent a reer da gentañ an eztaolñ pemdeziek a ra steuenn ar vuhez; kemmus ha nevez bemdez an dremmwelioù anezhi, padus ha diazezet-mat ar framm hag ar furmoù anezhi. Un diforc'h heñvel zo d'ober e-keñver an istor : pa lavaromp istor e tleomp kompren da gentañ ivez un eztaolñ pemdeziek a ra steuenn ar vuhez, pe, evel ma

-----  
si etienne

lavarer, an tonkad. Hogen an eztaoliñ-se, an eztaoliñ istorek, n'eo ket soniadoù na gerioù en deus da elfennoù, hogen darvoudoù. Arabat dre-se kemer darvoudoù istor ur bobl evel un danvez neptu a c'hall forzh piv kompren, a c'haller treuzkas eus ur bobl d'un all. Ken fin eo frammadur darvoudoù istor ur bobl, ken hir eo an hent evit tizhout o ster hag evit gerioù ur yezh. Test e c'haller bezañ dezho hep o meizañ maoc'h eget o klevout ur yezh estren.

Ar yec'hed evit ur bobl eo eztaoliñ darvoudoù m'en em anavez drezo ha m'en em ro da anavezout. E gwir n'he deus bezañs er bed estregeto.

Ar bobloù dizeriat zo taget gant ar vudelezh istorek. Ar pare nemetañ evito eo dont a-benn da gomz en-dro en o lavar istorek, eleze eztaoliñ darvoudoù.

Ur yezh a vez bezant er bed dre ma vez komzet war un tared bras pe vrasoc'h anezhañ. Heñveldra eo ivez evit al "lavar istorek". Breizh dizeriat zo aet d'ur skritell douaroniezhel. Er bed, e tenner da envel brezhon ar boblañs, an armerzh, h.a. anezhi, peogwir ez eo ar boblañs annezet el ledenez-se, armerzh al ledenez-se, h.a. Seurt bezañs avat zo anezhi ur vezañs douaroniezhel rik. Ha tennañ a ra, gant kresk an dizeriadur, da vezañ hep an disterañ bezañs istorek. Bezañs istorek he devo Breizh adalek ar mare ma krogo pobl Vreizh da furniñ darvoudoù brezhon, da lavarout eo da eztaoliñ un istor a zassono omni evel he "yezh" donañ adkavet, hag a vo lennet war-eeun gant ar bed evel frazennerezh sklaer un

tonkad brezhon hep an disterañ forc'hellegezh.

Deskrivet hon eus an div stad :

ar stad anistorek azonet evel-henn : ar bobl ne vez ket ken darvoudoù he buhez evel darvoudoù un istor; ar redi a bouez warni, - anezhañ an elfenn istorek nemeti a chom en he buhez, - ne vez ket meizet ganti evel redi istorek hogen evel ur redi natur : divroañ a reomp peogwir eo re baour hon douar d'hon magañ; buhez ar bobl er stad anistorek, ar bobl dizeriat, zo danvez an darvoudoù furmet gant ar bobloù all; ar bobl dizeriat, hi, ne furn darvoud ebet;

ar stad istorek azonet evel-henn : ar bobl er stad istorek, - lavarout a reomp c'hoazh : ar bobl en he rezid, - a vez an istor evel un eztaoliñ; evel ma reer anv eus komz, lavarout, pa lakaer ar yezh e penn-kont, e ve reizh ober anv eus "istoriñ", "tonkadañ" pa lakaer an istor e penn-kont; bezañ er stad istorek, bezañ en istor, istoriñ zo bezañ furmerez darvoudoù. Merkomp e kav an darvoud istorek daveennoù war un dro en un degouezh han-ezel, hag en un hengoun istorel : tarzhadenn Roazhon a gomprenet diouzh un tu evel respont Breizh d'ar gouelioù gall aozet en deiz-se e Gwened, diouzh an tu all evel ur frazenn distaget

en ul "lavar" milvedel, intentet diouzhtu gant an holl<sup>(1)</sup>; hec'h istor zo d'ur bobl en he rezid evel he yezh d'ur yezher : enrañ emañ evel ur galloud-estaoliñ, ur galloud reiñ ster d'ar bed, prest da vezañ arveret e pep degouezh.

Chom a ra da zeskrivañ bremañ an tremen eus an eil stad d'eben.

Diskouezet hon eus penaos e c'hell ur bobl dindan wask ur redi dic'houzañvedus kouezhañ er stad anistorek, a anvomp c'hoazh an dizeriadur. Penaos sevel d'ar stad istorek en-dro ? Aze e kejomp ouzh un domani a anavezomp mat, peogwir ez eo hini an emsav; an emsav zo anezhañ an emsevel eus ar stad anistorek d'ar stad istorek.

Kentañ kammed an emsevel eo merzhout gwir anien ar stad a redi m'emañ ar bobl dizeriat : n'eo ket un degouezh naturel na c'haller nemet en em ober outañ, hogen un degouezh istorel a gemmo forzh penaos, a gemmo evel ma vo lakaet da germañ gant an hini en devo galloud warnañ. Kredif a ra ar bobl dizeriat e rank divroañ peogwir n'he deus ket he bro barregezhioù natur a-walc'h d'he magañ. Kentañ kammed an emsevel eo d'ar bobl gouzout emañ o tivroañ peogwir n'he deus ket hi barregezh istorel da ren war ar pezh a sell outi.

(1) Un trede daveenn zo c'hoazh, an hini bouezusañ evel just, peogwir e kas d'ar pennabeg, d'ar pal ma tenn dezhañ ar furmiñ darvoudoù, an istoriñ. Evel ma seller ouzh un hontger e-keñver al lavar yezhel, e c'haller ober anv eus un "hontdarvoud" pe un "hontistor" e-keñver an ober istorel.

Kredif a ra ar bobl dizeriat e rank dilezel he yezh e-ser un emdroadur naturel eus buhez ar bed. Kentañ kammed an emsevel eo dezhi gouzout e tlezh he yezh peogwir ez asant da vezañ perc'hennet gant ur bobl all.

Roll an Emsav zo :

1) Terriñ mojenn ar redi naturel, ha lakaat anat emañ pobl Vreizh dindan wask ur redi istorel, pezh a reer c'hoazh gant gerioù all : istorekaat, politikaat ar boblañs;

2) Bleniañ pobl Vreizh en he youl da freuzañ ar redi istorel he gwask ha da adkavout mestroni war he zonkadur.

An div bazenn-se a vo moarvat unanet mui pe vui en amzer; rak an doare gwellañ da ziskouez n'eo ket ur redi naturel di-drec'hus m'emañ Breizh enket ennañ a vo c'hoazh kregiñ da freuzañ ar redi-se war-eeun.

Ar peurrest n'eus anezhañ nemet kudennoù eilrenk, a dleomp avat spisaat. Karout a rafen brastresañ labour an Emsav er stad m'emañ.

An Emsav a dleer meizañ evel anaouder pobl Vreizh war an hent he c'has eus ar stad anistorek d'ar stad istorek. Emañ an emsav enta tostoc'h d'ar stad istorek. Koulskoude, n'eus c'hoazh anezhañ nemet un deskad : emañ c'hoazh o studiañ "lavar istorek" Breizh, pe e gerioù all o tastum "hengoun istorel" ar vro; e-se emañ c'hoazh e-keñver politikerezh en derez m'emañ deskad Skol Ober e-keñver ar yezh. Tizhout a ray

e bal kentañ pa vo gouest da ober er vuhez gant al "lavar istorek" emañ o teskiñ, da lavarout eo pa grogo da furmiñ darvoudoù brezhon. Hogen neuze, ne vo ket pobl Vreizh gwall bell war e lerc'h, degouezhet ivez d'e heul er stad istorek, krog da grouiñ darvoudoù he donedigezh en istor; ken gwir ez eo frazenn Lenin : "Bale a ra an dispac'her e penn a-raok ar bobl, ur gammed hepken avat en he rask".

Ferc'hennañ al lavar istorek brezhon ne ra avat nemet an hanter eus deskadur an Emsav. Un anaoudegezh spis en deus da zastum eus ar stern ma tle al "lavar istorek"-se tregerniñ, eleze eus stad bremañ ar vro.

Poent bras eo ren ur studi gouiziel eus ar boblañs vrezhon. Enklaskoù a dle bezañ renet war stad armerzhel, kevredadoniell, politikel, bredoniell Breizhiz hon amzer; termenañ zo d'ober o ezhommoù dangorat hag ergorat e pep keñver : e-keñver boued ha yec'hed, e-keñver anezañ ha tiaveañ, e-keñver skoliata; e-keñver stuziadur, divezouriezh ha speredelezh; e-keñver labour, micher ha stummadur micherel, h.a.

Un niver a enklaskoù war an tachennoù-se zo bet renet c'hoazh hervez hentennoù gouiziel, n'eo ket e sell d'an emsaver avat; hag ar poent-se zo pouezus.

Arabat bezañ toulllet gant an anvioù-gwan "gouiziel", pe "skiantel". Un enklask war stad ar speredoù e Breizh a roy da anaout d'ar muiañ ar meskailhez luskadoù o ren er mare ma vo graet an enklask, ha tamm ebet war luskadoù padus, kantvedel, an emzalc'h brezhon, ha nebeutoc'h c'hoazh war

al luskadoù dic'hortoz a zifluko da geñver an dispac'h. Er mare-mañ da skouer e ve ar brasañ luskad en-dro d'an Tour de France. Disheñvel a-grenn, ha talvoudusoc'h evit anaout emzalc'h Breizhiz hor mare, e ve frouezh an hevelep enklask kreizennet war gudennoù Gouerezh an Henbont<sup>(1)</sup>.

Diaesterioù brasoc'h zo c'hoazh. Ar respontoù graet d'un enklasker gant ur bobl er stad anistorek ne c'hellont ket bezañ arveret war-ocun; ar veizidigezh he deus ar bobl-se anezhi hec'h-unan hag eus he c'hudennoù zo mojennek. Kounait ar goulenadegoù graet en Aljeria : bep ma'z ee an dispac'h war-rack ez eilpenne feur ar ya hag an nann. E Breizh, respont brudet ar c'houer sindikalour Lallouet : "An emrenerezh ? Fiv a brenfe va artichad ?" zo skouer splann an emzalc'h mojennek anistorek. Ar redi evit Breizh da gaout Paris evel empenn a oa meizet gantañ evel ur perzh naturel, ken divarrennadus hag ar perzh bezañ stag ouzh ar c'hevandir. Ha dre-se en em gave barrennet en e spered a-raok pep soñjezon kement framm armerzhel na zegemere ket ar redi-se evit raklakadenn.

(1) Un enklask gouiziel renet gant un emsaver a zegouezho gant disoc'hoù disheñvel dic'hoz an enklask gouiziel renet gant ur parizian. Ken gouiziel ha ken gouiziel e vo hentennoù an daou enklasker. An emsaver avat a yelo tostoc'h ouzh ar gwirvoud pa oar n'he deus Breizh dazont ebet er-maez eus an Emsav, ha pa framm e enklask war an elfennoù a ra istor gwirion ar vro. Tra ma chome ar parizian o tastum ur vordilhad a zevodoù munut na vo ket goude-se evit kevreañ en un deskriadur hollet o klotañ gant an darvoudoù a zo e go.

Forzh pe respont o tont digant ur c'henvroad er stad anistorek a dle bezañ deveizet dre lakaat e penn-kont ar raklakadem-se.

- Hep ar raklakadem-se ne c'hell ket bezañ studiet un darn vras eus al lavaredoù a glever e Breizh, evel da skouer :
- "Ar brezhoneg ? Petra rafen-me gant va brezhoneg ? Ne ven ket evit mont betek Kemper zoken !", pe :
- "Ar bobl vrezhon dre vras a fell dezhi bezañ gall".

N'eo ket e tle un enklasker barrennañ ha nac'h dastum ar respontoù-se. O studiañ a dle oberavat ouzh o adlec'hiañ er framm-bred ma tiwanont, eleze en ur framm-bred anistorek. Ur fazi all a ve klask enebañ ouzh an emzalc'hioù-se dre ur poellata-kend c'hiñ. Ar mezeg ne glask ket kendrec'hiñ ar c'hlañvour ez eo ur maen ha ket ur valzenn acour a wel dirazañ; reiñ a ra dezhañ al louzoù en tenno er-maez eus e ambren. Ar bobl a vo tennet er-maez eus hec'h emzalc'h anistorek, ned eo ket kement-se dre ar poellata, hogen dre ar sklerijenn a daolo an emzalc'hioù istorek pa he devo tro da arvestiñ outo.

Un evezhiadenn a rin c'hoazh kent disoc'hañ. An Emsav ne c'hall kemer diazez ebet war ar stad anistorek, war hini ebet eus ar mojennoù anezhañ. War ur poent dreist-holl ez eo ar mojennoù dafjerus : war boent ar c'heñver etre Breizh ha Frañs. Keit ha ma vo Frañs abeg ur redi evit Breizh, ne c'hall ar c'heñver istorek etre Breizh ha Frañs bezañ nemet

ar redi-se. Kement keñver all a c'hallfed ijinañ zo ur c'heñver mojennek. Goulenn ur stad kevreadel e Frañs evit mad Frañs ha Breizh zo mojenn. Fiziout war ur strolled politikel gall evit gwellaat stad ar traoù e Breizh zo mojenn. Aspediñ, gourdrour, gouzaviñ, tennañ evezh gouarnamant Frañs evit ma pledfe gant ezhommoù Breizh zo mojenn. Ouzhpenn mojenn, emzalc'hioù eneb-istorek, enebemsavek. N'eo ket bleuniañ an dizeriadur a zo d'ober, n'eo ket kempenn an anistor, n'eo ket dousaat ar redi a zo d'ober; hogen lakaat termen da vat d'an dizeriadur ha d'ar stad anistorek; freuzañ ar redi ha kemer en istor ar plas a zo dleet deomp.

))o((

Y O U E N N O L I E R

A R M E I Z A D A Y E Z H I S D I O R R E E T

Goulennet ez eus bet diganin komz diwar-benn kudenn ar yezh isdiorreet. E gwirionez, ha ret eo henn lavarout diouzhtu, ez eo ar meizad-se ur meizad kenereel a-grem. N'eus ket a yezhoù isdiorreet diouto o-unan hogen kentoc'h kevredigezhioù isdiorreet a gomz yezhoù a glot gant o stad. Dre vras eta e c'heller lavarout e komz unan ur yezh isdiorreet pa ra gant ul lavar ha na gere nemet ouzh darn eus e emgav kevredigezhel.

Ret eo merkañ diouzhtu amañ ez eus pazennoù war skeul ar yezhoù isdiorreet. Yezhoù zo, da skouer, d'ur mare 'zo eus o istor, a c'hell bezañ piaouet gant ranngevredigezhioù pe kenderedoù a zo a-walc'h dezho o-unan war-bouez nebeut. An dra-se a zo c'hoarvezet gant ar galleg pe ar yezhoù poblek all er grennamzer. Er gre-se e oa divrammet ar gevredigezh etre ar gloer, ar mererezh a skrive hag a gomze latin an hanter eus

an amzer hag ar bobl a gomze galleg pe ur yezh poblek all ha na ouie lemm yezh ebet a-hend-all. Fadal ne oa ket dañjerus bras an degouezhad-se evit ar yezh poblek evit abegoù sklaer a-walc'h. Dister eo renkadoù ar gloer; n'o doa ket darempredoù stank gant ar werin; an dachenn ma pledent ganti a oa un tamm er-maez eus buhez wirion an dud; en ur ger, ma oa al latin neuze un doare yezh a-berzh stad, ne c'helle ket bezañ arvarus evit ar yezh voutin dre ma oa dister framm ar stad dre vras. Dibaot e oa niver an dud desket; strizh a-hend-all tared an deskadurezh. Ar riez ne oa ket diorreet ha rak-se e c'helle ar yezh poblek bezañ a-walc'h dezhi hec'h-unan en ur gevredigezh a oa a-walc'h dezhi hec'h-unan hag a c'helle peurvuiañ tremen hep ar stad, war-bouez nebeut. Diskouezataenn ar c'hlad-dalc'hellezh a zo e gwirionez arouez marv pe zamvarv ar stad, patrom ar stad o vezañ na petra ar stad roman.

Un arvar bezus a oa evelato en emgav-se ha bez' e c'heller mat-tre empennañ diwanadur, kreskadur ha diorreadur ur stad etrevroadel evel an Iliz he defe kavet emsav ober gant al latin evit unvaniñ hec'h impalaeriezh. Moarvat ne vije ket : bet al latin-se heñvel ouzh latin an henamzer; emdreiñ en doa graet o tremen dre gouentoù ha skolioù-meur ar grennamzer. Hogen gallet he defe mat tre c'hoari roll an hebraeg en Israel en henamzer. Arabat eo ankounac'haat ez eo an hebraeg un hen yezh a zo bet troet da yezh ur stad arnevez.

Kement-se n'eo ket c'hoarvezet hag istor ar grennamzer a zo evit darn istor un nebeut stadoù broadel a-enep d'ar galloud diwall minor a oa dalc'het gant an Iliz. Pezh a zo dudius

avat eo studiañ penaos e teuas a-benn ar C'hallaoued - evel pobloù all o doa tizhet dinzezañ start o riez e derou ar XVIvet kantved - da strishaat ha kas da get tamm ha tamm al lec'h kemeret gant al latin e buhez ar vroad. Soñj a zalc'her moarvat eus embannadenn Villers-Cotterêts a c'houre'hemme ober gant ar galleg e-lec'h al latin war ar rolloù-parrez. Hogen adal derou ar XVIvet kantved ivez o deus klasket ar skrivagnerion c'hall diorren o yezh war dachenn al lennegezh hag ober anezhi ur yezh par d'al latin. Ho pezet soñj eus Joachim du Bellay ha Ronsard, hep kontañ meur a hini all. Er c'heñver-se eo mat notañ levezon Italia ha doa diorreet he yezh lennegezh da vihanañ. Levr du Bellay Défense et illustration de la langue française, da skouer, a oa troet koulz lavaret diwar an italianeg. Resizañ a ranker ivez evelato e oa kreñv-tre bepred levezon al latin : da skouer, Montaigne a voe desavet e latin; al latin en devoe eta da yezh e gavell, pezh na viras ket outañ a skrivañ e galleg a-c'houdevezh (hogen ar galleg-se, merkomp mat, ne oa ket evitañ yezh ar bobl ken-nebeut all, ur yezh lennegezh all evel al latin ne lavaran ket, o vezañ ma ne raed er vro m'edo o vevañ neuze nemet gant an okitaneg). A-hend-all Joachim du Bellay e-unan a skrivas e latin darn eus e oberennoù, evitañ da vezañ skrivet ul levr da zifenn e yezh e galleg end-eeun. Fadal, ar pezh a c'hellomp lavarout adal bremañ, eo e oa bet graet eus ar galleg ur yezh lennegezh a-berzh-stad gouest da zedennañ diwar neuze arall-yezherion, okitanegerion evel Marot e-unan a oa genidik eus ar Quercy elec'h ne gomzed ivez nemet okitaneg. D'ar c'houlz-se a-hend-all e oa ar galleg lennegezh ur yezh artifikel a-grem

evel m'henn diskouez doare yezh Ronsard pe du Bargas - e-touez re all - a zo leun a c'herioù kevrennek, tidel a-grenn a-wechoù, hag a yeas buan a-walc'h e-maez a implij a-hend-all. Nebeut a zarempred a oa etre ar werin c'hallegeriez hag ar skrivagnerion, pezh a zo merk-anaout ur yezh isdiorreet.

E meur a geñver all en em zouge ar galleg evel ur yezh isdiorreet : da skouer etre ar XIVvet kantved hag ar XVIvet en deus enbarzhet bernioù ha bernioù a c'herioù latin : fragile e-tal frêle, nation patrie e-lec'h pays, h.a. War ar poent-se e reas kemend-all ar saozneg hag ar brezhoneg ha moarvat e ve ur fazi eus hor perzh barn a-grenn seurt doare da zigoll an isdiorreadur d'an ampoent.

Ar galleg eta a oa d'ar c'houlz-se en ur stad gwan e-keñver al latin. Breinet eo bet ar yezh-se e gwirionez kement hag ar saozneg pe ar brezhoneg gant al latin. Ne daolomp ket perzh ouzh kement-se hiziv dre ma'z eo ar galleg ur yezh latin a orin ha dre m'omp bet boazet a-viskoazh da sellout ouzh ar gerioù-se evel gerioù gallek gwirion, hogen arabat e vefe disoñjal en deus bet ar galleg da stourm kalet e-pad kantvedoù ouzh an isdiorreadur.

Mac'homerezh ar galleg a gendalc'has d'ober e reuz e Bro-C'hall e-pad pell amzer war-lerc'h. Da skouer e savas Descartes e Discours sur la methode e latin, petra bennak ma voe embannet an doare gallek a-raok an hini latin. E skolaжоù ar Jezuided e kendalc'hjed hir amzer da reiñ al lec'h kentañ d'al latin. Ken boazet e oa meur a skrivagner gall en amzer-se da soñjal e latin ma teue o frazennoù dindan o fluenn gant

ereadurezh al latin : Bossuet da skouer. A zo gwashoc'h : er skolveur c'hall hec'h-unan e viras al latin ul lec'h a bouez betek diwezh an XIXvet kantved, peogwir e c'helljed difenn tezennoù latin er skolioù meur gall betek ar poent-se. E Bro-Alamagn hag e Bro-Saoz, hogen dreist-holl e Bro-Alamagn e padas pelloc'h c'hoazh beli al latin. Leibniz a skrivas ivez e latin a-raok treiñ war-du ar galleg, hag er skolioù-meur alaman e kendalc'hjed da gelenn er yezh-se betek diwezh an XVIIvet kantved. Ne gomzan ket eus an Iliz a zo ur gudenn ispisial o vezañ ma'z eo al latin dres he yezh vroadel hogen anat eo en deus pouezet ar framm-se da zerc'hel beli al latin e meur a vro e-pad kantvedoù kentañ an amzervezh arnevez. Hogen dre m'en em zigenveze ivez an Iliz diouzh emdroadur ar bed tro-dro e kozhe ivez he levezon hag hini he yezh war un dro. Trec'h pe zrouzivezh ur yezh a zo stag bepred ouzh darvoudoù politikel pe gevredigezhel.

Istor ar galleg a ziskouez dres n'eo ket an isdiorreadur ur gwall nag un namm evit ur yezh keit ha ma c'hell ar yezh heuliañ tost da vat emdroadur ha diorreadur ar gevredigezh hec'h-unan. Ar renkadoù trec'h nevez diwanet er gevredigezh c'hall o deus graet diouzhtu gant ar yezh vroadel evit kas da benn o c'hefridi. Kendere ar velestrourion, da skouer, e Paris, dre ma kreskas ar mererezh er stad, a reas gant ar

galleg; hini ar vourc'hizion, a zo dleet dezhañ emzispieg ar skiantoù, ha skignadur ar menozioù sklerijennus en XVIIIvet kantved e Bro-C'hall a arveras ivez ar galleg. Ur wech roet al lusk e tlee an emsav kenderc'hel da vont war-rnok hec'h-unan.

o

Un nebeut evezhiadennoù a rin bremañ diwar-benn natur an isdiorreadur. Evel m'em eus merket endeo n'eo ket an isdiorreadur un devoud digenere tamm ebet, unan hollereel ne lavaran ket. Ma kemeromp adarre skouer ar galleg e c'hellimp merzout e oa deuet ar galleg dreist-holl galleg al lez, an hini a oa skrivet ha komzet gant al lenneion hag an dud desket e Paris hag e Versailles, ur yezh paour-tre e-keñver hini ar XVIvet kantved. An darn vuiañ eus ar gerioù a oa bet ijinet neuze a oa aet da get er yezh, dreist-holl a drugere da vMalherbe. Hemañ avat en doa gouezet reiñ d'ar yezh he resis- ted hag he fervezhted a zlee talvezout dreist-holl e kelc'h- iadurioù-ren al lez hag ar mervaoù-meur e Paris hag e Vers- ailhez ha reiñ he brud dezhi a c'houdevezh. Perzhioù ur yezh komzet hag arveret stank he deus perc'hennet neuze. Paour-tre e oa ar yezh-se e-skonz yezh ar romantelourion pe zoken, hep- muiken, hini ar bobl. Padal ne sante ar C'hallaoued ezhom- ebet da glask ur yezh all. An hini o doa a oa a-walc'h dezho. Perak ? Peogwir o doa endeo e-tal ar yezh voutin a oa implijet

el lennegezh hag en darempredoù boutin yezhoù all, evit ar skiantoù, ar gwir, ar mererezh, dre vras, a spire a-grenn a-hend-all ouzh o doberoù ken n'o devoa dienez ebet eus ur yezh all. Kement-se a zo chomet gwir betek bremañ. Nevez zo avat eo paret ur c'hoarvezad dic'hortoz hag a c'hellfe lakaat ar galleg mui pe vui e renk ar yezhoù isdiorreet : techet eo bremañ darn eus an arbennigourion c'hall da implijout ar saozneg war-eeun er c'hendalc'hioù skiantel etrevroadel. Anavezet mat eo istor ar ouizieion c'hall yaouank o doa graet o diskuliadennoù e saozneg e Glasgow a gav din. Degemer a ran a-wechoù em levraoueg a-hend-all kelaouennoù etrevroadel embannet e Paris gant an C.N.R.S., a zo kaeroc'h, Insectes Sociaux, Colloques, da skouer, hag a vout pennadoù e saozneg. Klevet em eus zoken gouizieion c'hall yaouank, anezho strizh- arbennigourion, o tiskleriañ din perak e oant rediet koulz lavaret da skrivañ e saozneg : war dachennoù zo eus ar skiant ne c'hellfent tizhout nemet dek bennak a arbennigourion, ugent d'ar muiañ, tra ma tizhout meur a gantad diouzhtu gant ar saozneg. Rak setu an dalc'h : ma oar an holl c'hallegerion a ra war-dro skiantoù zo ar saozneg, ar saoznegerion avat ne ouzont ket holl ar galleg. Ne vern penaos e vint techet da dremen da zister kement a vez moulet e galleg a-zivout o danvez o vezañ ma vez savet e saozneg 90 % eus ar skridoù a denn d'o skiant ha 10 % hepken e galleg. (An niveroù-mañ a zo gwir evit an darn vuiañ eus ar skiantoù, a gav din.)

Evel ma weler etaez eo douget an holl yezhoù er bed a- vremañ, nemet ar rusianeg, da vezañ isdiorreet e-keñver ar



KUDENN AR BREZHONEG

War a seblant ha betek-henn ned eo bet ar brezhoneg ur yezh diorreet nemet da vare an henvrezhoneg pa oa benveg displegañ ur gevredigezh diorreet, da lavarout eo, a oa a-walc'h dezhi hec'h-unan. A-dal ar Grennamzer avat e voe kemmet penn d'ar vach d'ar c'houlz ma voe diazezet ar c'hlad-dalc'helezh a skoulmas gant ar riez c'hall liammoù stank ha liesseurt. Notit a-hend-all ne oa ket isdiorreet ar brezhoneg en amzer-se dre ma oa paour adarre pe dre ma oa bet chouket ennañ gerioù gallek e-leizh. Ur seurt brizh-voaz en em gavas ivez gant ar saozneg d'an ampoent, e-giz m'em eus merket endeo. Ar gerioù latin a voe enbarzhet er yezh a oa un tu da ziorren ar yezh en un amzer ma oa an dud e pep bro dic'houzvez a-grenn eus ar sturyezhouriezh. Lavarout a c'heller avat e oa isdiorreet ar yezh peogwir ne spire ket d'ar mare-se endeo ouzh ezhommoù ur gevredigezh klok. Melestrourion a bep seurt, gwiraourion, h.a. a zilez al latin evit degemer ar galleg. Ar Coutume de Bretagne a voe savet e galleg. Labour ar vel-estrouurion vreizhat d'an ampoent a voe savet e galleg. Kêrioù brasañ Breizh a-hend-all, Roazhon ha Naoned, a oa poblet hepken gant gallegerion. Daou wiskad pe tri gwiskad poblañs distag krenn a oa eta d'an ampoent e Breizh : hini ar vrezhonegerion dizek, hini ar romanagerion dizek, erfin hini ar c'hallegerion-latinegerion, an daou wiskad kentañ o vezañ isdiorreet e-keñver an trede.

Evel-just e washaas isdiorreadur ar yezh e-pad ar c'hantvedoù da heul, pa voe staget Breizh ouzh ar stad c'hall ha pa voe lamet an emrenerezh diganti. Evelato ne voe ket santet da gentañ gant an darn vuiañ eus ar yezherion ar stad a isdiorreadur. Perak ? Peogwir e oa unded Vreizh diwar-c'horre abaoe meur a gantved endeo; bez e oa enni div gevredigezh distag, pe ma karit div bobl e Breizh. Diouzh un tu ar werin, gwerin ar maezioù, a gomze rannyezhoù keltiek pe romanek; diouzh an tu all kêriz ha bourc'hizion a gomze galleg. Etre an div gevredigezh-se ne oa ket nemeur a zarempred : an dud diwar ar maez d'an ampoent a chome serret warno o-unan, hag en em veve tost da vat diwar embourvezerezh, hep kenwerzh koulz lavaret. Kalz a dud a dremene o buhez hep bezañ deuet er-maez eus o c'horn-bro, hep kaout darempred ebet gant merezeh ar stad, nag hini an deskadurezh, nag hini al lu, nag hini ar c'hedskor. En ur stumm eta e oa ar brezhoneg ur yezh a vaste da ezhommoù ar gevredigezh-se; bez'e oa anezhi ur yezh diorreet evit an implij a veze tennet diouti. Ar gwall e voe e oa isurzhiat ar gevredigezh-se d'ar gevredigezh all diorreetoc'h, hini ar c'hêrioù a oa gall. A-hed an 19vet kantved ha kalz muioc'h en 20vet kantved. Evel-just e klaskjed diwar neuze stourm ouzh an isdiorreadur dre sevel e brezhoneg skridoù a zeree ouzh tud a oa lodek dija e sevenadur ar c'hêrioù hag a chome stag dreist-holl, bepred, ouzh sevenadur ar maezioù. Barzhaz Breizh a voe unan eus an oberennoù-se; an hini arouezusañ d'am soñj dre ma bet savet evit ur c'hendere a dud ma n'oa ket anezhañ c'hoazh e Breizh hini ar veurc'hiz-

ion lennek. An oberennoù all en XIXvet kantved hag e deroù  
an XXvet kantved a voe oberennoù kemmesk, evel m'en deus  
merket mat Roparz Hemon, a veze mennet da blijout da vaezidi  
gonezet mui pe vui da sevenadur ar c'hêrioù, e gwirionez.  
Seurt oberennoù bastard avat ne c'hellent ket kaout un daly-  
oudegezh uhel dre ma oant savet evit ur gevredigezh distart  
a oa a-benn neuze war hent an dispennadur.

Studiañ istor ar yezh e Breizh, studiañ istor isdiorre-  
adur ar yezh e Breizh a zo e gwirionez studiañ istor isdiorre-  
adur ar gevredigezh vreizhat hag hi o tremen eus an emgav a  
gevredigezh vaezel klok o tarc'hel etre 80-90 % eus ar boblañs,  
dreist-holl e kornog ur vro, hep darempred ebet gant ar Stad  
hag ar sevenadur kêrel, da hini ur gevredigezh aloubet muic'h  
mui gant mererezh ar Stad hag ar sevenadur kêrel. Ar menozioù-  
se am eus displeget meur a wech, ha moarvat ez int splann a-  
walc'h. Souezhus eo hepken o defe gallet stourmerion krediñ  
e c'helled saveteiñ ar yezh war ar maez da gentañ hag hepken,  
pa oa anat e oa barnet ar sevenadur-se d'ar marv.

Frederiomp un tammig. Abaoe 1880 e tremen holl vugale  
Vreizh dre ar skolioù gall a stumm anezho diouz patromoù  
sevenadurel kêrel. Tremen a reont dre al lu gall a gendalc'h  
en ur washaat anezhañ labour ar skol. War ar marc'had ez eus  
bet taolet war an dud rouedadoù a vererezh kenstur, foran ha  
prevez stank da sabatoù. Ne gomzan ket eus hini an tailhoù  
da skouer, a zo kozh, eus ar re nevez na c'heller ket tremen  
hept; hogen hiziv an deiz e keomp gant ar c'hedskor hag ar  
c'hensikourioù a bep seurt, hini ar yec'hedouriezh a-berzh-

stad; hini ar strolladoù relijiel, micherel, kenverzhel, grean-  
terezhel ha politikel a zo diazezet holl e Paris, e kêr(1).  
En ur ger, liesaet, lieskementet eo ar vuhez kevredigezhel,  
hag al liesadur-se a zo bet gall hep muiken, a zo deuet hepken  
eus an estrenvro, a zo bet displeget hepken dre yezh an estren.  
N'eus diforc'h ebet evit ur bobl etre an isdiorreadur hag ar  
stigidigezh ouzh ur stad estren a seven pep beli warni.

Kemer a rin ur skouer evit diskouez penaos e c'hell ur  
yezh dont da vezañ isdiorreet war ar bazenn izelañ, hini ar  
vuhez pemdez, dre ma voe degaset kemm e buhezgezh voutinañ  
an dud gant aloubidigezh ar vro gant galloudoù armerzhel estren.  
En devezh all e lennen ur pennad war Hor Yezh e-lec'h e klemm-  
ed penaos e ouie an nevezvrezhonegerion ober gant ur bern  
gerioù skiantel, hogen e choment boud, siwazh, bewech ma veze  
anv a blediñ gant emelloù boutinañ ar vuhez pemdez. Da skouer,  
a lavare ar skrivagner, o deus goveliet gerioù e-leizh evit  
komz eus anadennciezh ha me oar-me, met allaz ! evit komz eus  
"feu vif", ha "feu doux" e chom o fri war ar gloued.

Ma n'eo ket ur vezh, a gendalc'h ar buruteller. Gwelout  
ur skrivagner brudet oc'h ober gant gallekadurioù euzhus evel  
"Luc'hedenn dre gafe" pa vije bet ken aes mont da c'houlen  
ouzh Bigoudened Plomeur penaos e anver ar seurt gwastell :  
biz dienn.

Me ' gav din n'en deus ket komprenet ar buruteller mat-

(1) Ar gevredigezh a zo deuet da vezañ muic'h-mui kenframmet,  
gant darempredoù diabarzh stank kenañ.

tre ar gudenn. An troioù-lavar "feu vif", "feu doux", tro-  
iennoù boutin ma'z eus e yezh ar c'hallegerion a-vremañ a  
zo e gwirionez troiennoù nevez o klotañ gant devoùdoù nevez  
dianav ergentaou. Ma ne fazian ket ez int deuet er yezh  
c'hallek adal ar mare ma teuas ar c'hiz d'ober tan diwar  
aezhenn-leskiñ ha tredan, pa c'helled reizhañ gwrez an tan  
evel ma kared, hag an troioù-lavar-se a zo bet ijinet nevez  
zo gant kalvezourion evit ezhommoù o micher<sup>(1)</sup>. E derou ar  
c'hantved-mañ avat, 80 % eus an tiegezhioù war ar maez a  
rae tan en oaled dindan un trebez, da fardañ ur boued gros  
a-walc'h, ret eo anzav. N'ouzon ket penaos o deus troet kegin-  
ourezed Breizh a-vremañ an troioù-lavar-mañ "tan bras"ha"tan  
dister" lakomp, hogen ne vefen ket souezhet o defe kemeret  
meur a wech an troioù gallek o-unan peogwir ne glot ket an  
troiennoù brezhonek hengounel gant an devoùdoù nevez o deus  
da dalañ outo. Ma kemeromp degouezh brudet al "luc'hedenn  
dre gafe" a zo troet a-hervez gant "biz dienn" e bro ar  
Bigouden e c'heller merkañ kement-mañ. Ar gwestell nemeto  
a oa anavezet war ar maez e Breizh hanter-kant vloaz zo a  
oa dibaot-tre : bez e oa anezho farsoù ha kouignoù hag un  
nebeut re all ne vefe ket hir ar roll anezho. Arabat disoñjal  
ne oa forn ebet en tiegezhioù hanter-kant vloaz zo. E Gwaien  
da skouer, ne veze graet fars nemet da geñver gouel Sant  
Rumon, paeron ar barrez. An tonz a veze ozet er gêr hogen  
kaset e veze da boazhañ e forn ar baraer. Petra dezastum  
eus kement-se ? Netra nemet ez eo kêrel - da lavarout eo gall  
- an holl westell a zo debret hiziv e kêr koulz ha war ar

(1) An dro-lavar c'hallek kozh a zo hepmuiken "petit feu".

maez, hag ez eo koll amzer klask reiñ anvioù brezhonek dezho.  
N'eus forzh pehini a vo mat, gant ma vo savet evit ur gevred-  
igezh vrezhonek. N'hor bo gwir anvioù brezhonek nemet en deiz  
m'hor bo ur wastellouriezh vreizhat, lakaomp da lavarout eo  
en deiz ma vo hor sevenadur danvezel deuet da vezañ dishual  
ivez.

Ur skouer lu am eus dibabet a-ratozh. Hogen pezh a fell  
din lavarout eo ez eo ar yezh isdiorreet ar yezh a zo stag  
ouzh ur sevenadur estren a-grenn. (Fars eo lavarout hon eus  
bremañ ur sevenadur gwirionez). A-se ne c'heller  
ket diorren ur yezh penn da benn hep diorren ar vro hec'h-  
unan, hep krouiñ ur sevenadur. Pazenn gentañ an emziorren evit  
ar vro, pazenn gentañ krouidigezh ur sevenadur avat, ez eo ar  
Stad hag e degouezh Breizh ne c'hell ket bezañ n'eus forzh pe-  
seurt Stad. Kement-mañ a venan lavarout adarre : ma chomfe,  
da skouer, an armerzh etre daouarn gall e kendalc'hfe ar vro  
hag ar yezh da vezañ isdiorreet. Savidigezh ar Stad eta a zo  
amplig gentañ diorreadur ar vro hag ar yezh hec'h-unan war un  
dro.

Kompren a reer bremañ talvoudegezh ur framm evel S.A.D.E.D.  
evit diorren ar yezh. Ar pezh a varne hor yezh d'ar marv betek  
bremañ e oa an diouer a ziazez. Marv ar yezh ne oa nemet ar-  
ouez marv ar gevredigezh. Evit adsevel ar yezh eo ret da gentañ  
adsevel ar gevredigezh<sup>(1)</sup>, da lavarout eo adsevel ur Stad.  
S.A.D.E.D. en deus sammet warnañ da gentañ gwazadur ar

(1) Ur yezh ne c'hell ket bezañ en un amved estren.

stad a oa an aesañ sammañ : hini an deskadurezh. Hogen anat eo e tleo en amzer-da-zont ledañ tamm ha tamm e oberiantizoù e seurt doare ma talc'ho a-benn holl dachennoù oberiañ ur Stad. Kement-se a zo ret ma fell deomp e teufe ar brezhoneg da vezañ ur yezh diorreet - da lavarout eo o klotañ gant ezhommoù ur gevredigezh vodern - . Anez tizhout ar pal-se e varvo ar yezh hep distro.

Rak, setu ivez unan eus ar c'hudennoù diaesañ hon eus da ziskoulmañ e-keñver ar yezh diorreet a fell deomp aozañ. Peurvuiañ betek-henn ez eo bet al labour diorren ar yezh hini un den nemetken. Vallee, Mordiern, e derou ar c'hantved -mañ ha Roparz Hemon en eil palevarzh. Kalz a labour a zo bet graet d'ar mare-se moarvat hogen diasur ha bresk e chome frouezh al labour-se dre ma chome hiniennel. Sur mat e oa kreñv a-walc'h levezon Vallee ha Roparz Hemon evit ma tegemerfe o diskibion da reolenn ar pezh o devoa divizet. Hogen ken ec'hon eo en eil hanter kantved-mañ tared an diorren ma ne c'hell bezañ leuniet nemet gant ur bodad a arbennigourion urzhiet mat o labourat a-stroll hag o c'houlenn digant o c'helennidi ur sentidigezh strizh.

o

o o

Bez e c'hellomp ensellout bremañ kudenn ar skrivagner en ur vro isdiorreet, dreist-holl degouezhet war bazenn izel-añ an isdiorreadurezh evel Breizh.

Parañ a ra an isdiorreadurezh war veur a rez. Da skouer, e-keñver niver al lennerion. Dister-tre ez eo : etre 200 ha 500, ha diwar an niver-se nebeut a oar ar yezh a-walc'h hag a zo desket a-walc'h war arz al lennegezh evit tanva an ober-ennoù. An darn vuiañ n'o deus graet nemet damzeskiñ ar yezh ha klemm a reont dre ma'z eo pe uhel live ar skridoù a vez pourchaset dezho gant ar skrivagner. Temptet e vo eta ar skrivagner da baouez a skrivañ, pe da izelaat rez e skridoù evit kejoat gant e lennerion. Amañ e weler penaos e kas an isdiorreadurezh d'ar marv end-eeun. Seurt arvar n'eo ket faltaziek penn-da-benn. Goude bezañ embannet e tlee ar menezioù dont davetañ, en deus kavet gwell Roparz Hemon d'ur mare kerzhout daveto. EVEL-se en deus savet ar brezhoneg eeun : diouzh ma n'oa ket aozet ar yezh-se a-ratozh evit an deskerion pe ar vugale nemetken e oa ar brezhoneg eeun ur giladenn. Graet evit tud o doa hanter dizesket ar yezh ne c'helle degas dezho sikour ebet koulz lavaret evit peurzeskiñ amezhi.

Diemsavet eo ar skrivagner brezhonek e meur a geñver all. Mankout a ra dezhañ hiziv an deiz, da skouer, ur c'helc'hiadur ledan kenyezh dezhañ. Bevañ a ra peurliesañ e kêr, e-touez gallegerion, e-kreiz ur sevenadur gallek. Un namm kausus kenañ eo an dra-se rak war var e vo da skrivañ ur yezh reut ha diliv, difetis, ma ne ziwall ket, peogwir e ray diouer dezhañ an holl droiennoù a ijin ar bobl bemdez a-vil-vern.

Moarvat e c'hell kejou ar skrivagner gant yezherion a-vihan-  
ik, pe lenn skridoù ar skrivagnerion gozh o doa bevet en un  
aergelc'h hag en ur c'helc'hiadur brezhonek. Hogen neuze  
zoken e kavo dirazañ skoilhoù bras. Dreist-holl, da skouer,  
oad hag orin ar yezherion e c'hell komz ganto : ar re-mañ  
a zo kozh, diwar ar maez, dizek, diouzh ar c'hendere a zo  
deuet da vezañ estren outañ hag a zo o vont da get muioc'h-  
mui, hini ar gouerion. Kemend-all a c'heller lavarout diwar-  
benn al levrioù poblek : ar yezh vev-se ha na gaver mui ne-  
met el levrioù koulz lavaret a chomo evitañ e-unan ur yezh  
varv, ur yezh levrek hag er c'heñver-se n'eus netra marvoc'h  
 eget an dastumad troioù-lavar poblek embannet gwechall gant  
Roparz Hemon hag int o tennañ holl pe dost d'ar vuhez war  
ar maez ha n'eo ket mui hini ar skrivagnerion a-vremañ.  
Evitañ eta e chom ar yezh poblek dre ma'z eo marv ar bobl  
he c'homze (1) un dra artifikel a-grem. Kavout a ray dezhañ  
eta bepred e skriv ur yezh tidel, hag ar merzad-se a zo e  
gwirionez ur merzad digennerzhus meurbet. An dihez nemetañ  
a gav eo e vezo ar yezh a skrivo diazez ur yezh vev nevez  
warc'hozh a zivano hag a gresko en dro-mañ er c'hêrioù.  
Hogen da c'hortoz, ret eo anzav, ez eo diaes hag amjestr-  
kenañ e emgav.

o

o o

(1) Da vihanañ evitañ peogwir ne c'hell mui skoulmañ darempredoù  
gwirion ha padus gant ar re a gomz c'hozh rannyezhoù brezhonek.

Ur mank all eo dres ivez an diouer a levrioù arnevez  
savet diwar-benn testennoù arnevez. Ne gomz ket amañ evel-  
just eus al levrioù a skiant savet, n'eus forzh penaos, gant  
arbennigourion. Moarvat ez eus un nebeut levrioù bet savet  
dreist-holl gant Roparz Hemon, hogen er-maez eus ar re-se,  
petra a gaver ? Netra koulz lavaret. Al levrioù-se a-hend-all  
hag int distank n'int ket liesseurt a-walc'h. Roparz Hemon  
da skouer, en deus skrivet romantoù, hogen ar romantoù-se a  
zo savet evel kontadennoù pe vojenoù ha n'int ket evit pour-  
chas patrom ebet d'ar skrivagner a fello dezhañ sevel ur romant  
diwar-benn buhezegzh pe vredoniezh kempred ar Vretoned, pe  
n'eus forzh peseurt testenn all (1). Betek-henn, da skouer, ez  
eo chomet ar brezhoneg ur yezh dezrevell ha n'eo ket ur yezh  
deskrivañ. Evel-se eta e chomo nec'het ar skrivagner brezhonek  
pe ranko ober gant e yezh a-benn taolennañ al lec'h pe un traez  
en un doare resis, pe c'hozh trivliadoù un dudenn bennak, o  
vezañ ma ne gav oberenn ebet da gemer da batrom. Dav eo dezhañ  
krouiñ e yezh, hag er grouidigezh-se e kavo trapedoù ha gripedoù  
e-leizh hag a bep seurt, an hini washañ o vezañ tidadezh e  
zisplegerezh dre vras.

Setu dres an arvar brasañ evit ur yezh isdiorreet evel  
hon hini : an didelezh. Da skouer, diouer a ra deomp ivez div  
reolenn start : hini an "arver", peogwir n'eus mui a gela-  
iadur brezhoneger desket ec'hon a-walc'h evit mont da ziazez

(1) Awenadur diwezhat Roparz Hemon a rank bezañ diskleriet ivez  
dre an harlu. E-barzh "Kleier Bured" da skouer, en deus livet e  
brezhoneg gallegerion Gêr Vrest.

ar reolen; d'ar c'houlz-se e tlefe ar yezhadurourion kemer e lec'h : ar re-mañ avat n'o deus ket graet an hanter eus al labour a zlejent bezañ graet ha pergen n'o deus ket savet al levrioù a oa ret diwar-benn kevredurezh hor yezh. Me ' car ez eus bet klasket sevel studiadenoù diwar-benn yezh ar skrivagnerion boblek, hag an dra-se, sur mat, a zo mat ha rekis. Ken rekis all eo avat derc'hel kont eus yezh ar skrivagnerion arnevez, rak bout ma n'int ket mui a-stok ouzh brezhonegerion ar bobl ha ma c'hellont ober fazioù o klask goveliañ ur yezh nevez, e lakaont evelato muioc'h a aked hag a evezh en o skridoù eget ar skrivagnerion gozh hag o skridoù int eta, a zlefe kerkoulz all bezañ penndanvez studi ar yezhadurourion.

A-benn ar fin e vo savet patrom ar yezh war un dro gant ar yezhadurourion hag ar skrivagnerion o-unan. Ne gredan ket e c'heller evit ar poent, goulenn digant ar skrivagnerion heuliañ bepred ha penn-da-benn reolennoù resis ijinet gant yezhadurourion. Un tamm frankiz a zleont mirout. Ar pezh a ranker goulenn diganto avat eo derc'hel start d'ar reolenn o devo merket dezho o-unan, ha chom hep tec'hout nepred di-outi, klevet evel-just e heuliont dre vras ar reizh voutin.

Klaskomp dezastum. An isdiorreadur yezhel zo ur c'hoarvezad a en em ziskouez bewech ma sav digloterezh etre rez ar sevenadur, stad ar gevredigezh hag ar yezh hec'h-unan arveret betek neuze gant ar bobl. Evel-se eta ne c'hell ket an isdiorreadur-se bezañ lamet dre reizhoù yezhel nemetken, daoust ma'z eo ret ober ganto evelato, hogen da gentañ dre reizhoù kevredigezhel. Ar pezh a zo a-bouez war ur bazenn gentañ eo krouiñ ur stroll a nevezyezherion a vo kraonell ur bobl nevez. Kement-se avat ne c'hell bezañ nemet ul loc'hvan War var e vo bepred ar graonellad-se diazezet dreist-holl war an tiegezh da vezañ beuzet gant an amva estren a zo ouzh he gromañ hag he gwaskañ a bep tu. Bugale ar stroll-se, da skouer, hag int savet e kêr en ur c'helo'hiadur arallyezh a ouezo gwell da gentañ ar yezh estren eget ar yezh vroadel. O yezh a chomo evito bepred ur yezh isdiorreet daoust ma n'eo ket kement hag evit tud ar bobl, dreist-holl o devo lorc'h n'eus forzh penaos gant o yezh. Ret eo eta tizhout buan a-walc'h an eil pazenn a zo savidigezh ar stad vroadel a-benn astenn ar graonellad nevez-se d'ar bobl en he fesh. Pal ar Stad e tle bezañ skarzhañ da gentañ an divyezhegezh a zo arouez pennañ ar yezh isdiorreet. An dañjer a c'hell bezañ neuze eo ar stourm eus kendereoù zo eus ar bobl estrennaet ouzh emziorreadur ar yezh hag an digarez a implijint e vo ne c'hell ket spirañ hor yezh ouzh ezhommoù ur gevredigezh vodern ha gwir e vo evit darn hep mar ebet. Hogen ma plegfemp da seurt argandurioù e chomfemp da viken en isdiorreadur hag e tisoc'hfemp da varv ar yezh. Moarvat ne vo ket aes er penn-kentañ ober gant

ur yezh a chomo reut evit an implij a rankimp tennañ diouti hogen arabat eo disoñjal e vez kreñvaet an organ gant an embregerezh. Evel-se eta ne bado ket pell moarvat ar mare-vezh emocañ-se evit ar yezh. Prouez a rale en deiz ma ne vo mui tentet ar Vretoned da arverañ ur yezh estreget o hini peogwir ne ouezint ervat yezh all ebet. War un dro, hag evit ar wech kentañ abaoe kantvedoù, e vint emouez da vat ouzh o broadelezh, hag e vint adarre ur bobl. Argas an isdiorreerezh war dachenn ar yezh eta a zo da gentañ adkrouiñ ur bobl.

#### Notenn.

An emsav e Breizh a zo e gwirionez ur c'hoarvezad a emziorren e framm ar gumuniezh europat. Tennet en deus an emziorrendur en Europa abaoe derou ar c'hantved-mañ da astenn an deskadurezh dre holl gendereoù ar gevredigezh ha da lièsaat ar c'hreizenoù sevenadur. Inkomp, n'eus ket tu da em-pennañ emsav ar vicherourion e-unan ma ne vije ket bet ledet an deskadurezh en o zouez dre an deskiñ lenn. Heñvel eo e Breizh, kempred eo bet an emsav da ledadur an deskadurezh en hor bro, daoust ma'z eo deuet houmañ dre hent ar galleg. Graet e oa an arz, al lennegezh, gwechall evit un nebeudig a dud o chom en un nebeudig a greizenoù evel Paris, Gwennzin, London. Ar c'halvezerezh en deus roet tu da skignañ ar sevenadur e pep keñver hag a bep tu. N'eus forzh piv da skouer, a c'hell krouiñ ha dastum dielloù, pezh a oa dic'hallus gwechall evit an holl dud koulz lavaret (moulañ, luc'hskeudennañ, filmañ, sonenrollañ, h.a.). Emañ emsav Breizh eta en un ar-

gerzhad hollek.

A zo muioc'h. Ar c'hendereoù nevez deuet d'ar sevenadur e Breizh a c'houlenn ivez patromoù nevez. Chafis Breizh ez eo ivez gellout pourchas dezho ar pezh a zicueront. Sevenadur Bro-C'hall hag eñ graet evit un toullad noblañsoù ha bourc'hizion e Paris ne zere ket outo. E Breizh e kavint eta ar pezh a glaskont.

Adarre e tiskouez ar Poell hon hent deomp. Hogen pal an hent-se ne c'hell bezañ tizhet nemet dre hor youl hag hon nerzh.

)o((

T A O L E N N

	P.
Isdiorreadur hag Armerzh gant Per PENNEK .....	3
Isdiorreadur hag Ister gant Gwilherm DUBOURG .....	25
Isdiorreadur ha Bredoniezh gant Gi ETIENNE .....	45
Ar Meizad a Yezh Isdiorreet gant Youenn OLIER .....	65

)) o ((

mmmm mmm mmmmm mmm mmmmm mmm  
 mm m mmm m mmm m m mmm m  
 mm m mmm m mmm m m mmm m  
 mm m mmm m mmm m m mmm m  
 mm m mmm m mmm m m mmm m  
 mmm mmm mmm mmm mmm mmm  
 mm m m mmm m m m mmm m  
 mm m m mmm m m m mmm m  
 mm m m mmm m m m mmm m

Komanant	12 niverenn	.....	45 FF.
Komanant d'ar Geriadur Istorel	Hepken (4 niverenn)	.....	15 FF.
Komanant hep ar Geriadur Istorel	(8 niverenn)	.....	30 FF.

Rener : G. ETIENNE  
Embanner : L. LEMOINE  
Sekretourion : P. CALVEZ, M. POULAIN

Al lizheroù da : PREDER, 30 Place des Lices, 35 - RENNES  
 An arc'hant da : M. G. ETIENNE, CCP 16 093 13 , Paris

Eil trimiziad 1967  
 Priz ar ch'aier-mañ 9 FF.

Moulet gant SADED  
 CPPP Nn 35.709  
 Diskleriet hervez lezenn, Eil trimiziad 1967.

